


splann !

Pesketaerezh Breizh o koll ar stur



An Annelies Ilena a zo anezhañ al lestr-pesketa ar muiañ dekriet er bed. Abaoe 2024 e vez korvoet gant Compagnie des pêches Sant-Maloù. Skoet e voe ar filierenn pa voe postet arc’hant gant an embregerezh en ur ramz war-neuñv ken hir ha 145 metr. Ha klevet e vez ur goulenn : petra a zeuio ar pesketaerezh da vezañ e Breizh ?

10 €



9 791098 865808

Enklaskoù Splann ! bet embannet

Breizh : c’hwezh an amoniak er maez,
Caroline Trouillet, 2021

Metan : Bec’h d’an atant,
Julie Lallouët-Geffroy, Raphaël Baldos, 2022

Essure : drouk mouget e korf ar merc’hed,
Juliette Cabaço-Roger, Faustine Sternberg, Guy Pichard, Rozenn Le Carboulec, 2022

Brezel ar parkeier,
Julie Lallouët-Geffroy, 2023

Cooperl : enklask war un embregerezh pemoc’h ramzel,
Kristen Falc’hon, Ivan Logvenoff, 2023

Keuzioù ha girzhier en arvar,
Yann-Malo Kerbrat, Nolwenn Weiler, 2024

Klañv eo porzh Sant-Nazer gant e industriezhioù,
Samy Archimède, Itzel Marie Diaz, 2024

Mengleuzioù pistrius e Breizh,
Célia Izoard, Morgan Large, Catherine Le Gall, 2024

Aodoù Breizh : temptadur ar betoñs en arvor,
Jérémy Szpirglas, Denis Vannier, 2025

Ospitalioù publik : un distruj programmet, ur marc’had evit ar gennad prevez,
Isabelle Jarjaille, Caroline Trouillet, Raphaël da Silva, 2025

Ar gennad prevez oc’h ober e doull el liseoù labour-douar,
Chloé Richard, Faustine Sternberg, 2025

Pesketaerezh Breizh o koll ar stur,
Robin Bouctot, Catherine Le Gall, 2026

Kit da lenn hon enklaskoù ha pennadoù en ur mod digoust e splann.org

Enklaskoù *Splann* !

Pesketaerezh Breizh o koll ar stur

Robin Bouctot
Catherine Le Gall

***Splann* !**

Ti ar vro
3, plasenn Maez ar Roue
22 200 Gwengamp

Renner an dastumad

Alain Goutal

Kazetennerien

Robin Bouctot
Catherine Le Gall

Tresadenoù

Damien Roudeau

Bet heuliet gant

Julie Lallouët-Geffroy

Difazhiet gant

Julie Lallouët-Geffroy,
Caroline Trouillet

Laket brav gant

Anne Caillet-Leroy

Troidigezh

Lena Catalán Marcos

Adlennet gant alvokadez

Claire Simonin

Mouller Roudenn

ZI de Bellevue
BP 10129
22 201 Gwengamp

Menegoù lezenn :

3^e trimiziad 2026
Embannet e miz Gouere
2026
Enklaskoù *Splann* ! n°12





Koumanantit d'hol lizher-kelaouiñ

Resevit bep miz keleier ha ne gaver neblec'h all ebet, ha bezit kelaouet bep tro ma vez embannet un enklask nevez ganeomp. Digoust eo ! Evit en em enskrivañ : splann.org/infolettre

Hag anavezout a rit Splann ! ?

Ur strollad kazetennerien o labourat e Breizh omp, c'hoant ganeomp kelaouiñ diwar-benn an endro ha gwirioù mab den lakaet en arvar. Abalamour ma oa bet klasket gant tud'zo mirout ouzh kelaouennerien d'ober o micher dre gas anezho dirak ar justis ha spontañ anezho (Ines Leraud en o zouez), hon doa divizet krouiñ *Splann !* e 2020.

Diwar skouer *Disclose*, hor media paeron, e fell deomp kas enklaskoù da benn ha lakaat anezho en linenn war hol lec'hienn, ha war reoù mediaoù kevelerien, en ur mod digoust, e galleg hag e brezhoneg.

En deiz a hiriv zo ur skipailh kazetennerien gopret gant *Splann !* o labourat en hor sez e Gwengamp. Kelaouennerien all a vez paeet ganeomp d'ober an enklaskoù ha tud a youl-vat a vez o sikour e meur a vod evit kas hor c'hefridi da benn.

Ur media dizalc'h...

Evit gellout lakaat hor fri e-barzh aferioù kizidig e rankomp bezañ dizalc'h e-keñver ar gal-loudoù politikel hag ekonomikel a-bep-seurt. Ablam da se e nac'homp degemer arc'hant liammet gant bruderezh ha yalc'hadoù digant ar strollegezhioù lec'hel. Diwar donezonoù kantadoù a lennerien (erezed) e vev *Splann !*

Ar stumm kevredigezhel a zo ur mod deomp da chom emren ha mestr war hor media. Levezon ebet o pouezañ warnomp gant kevranerion binvidik. Izili hor c'huzul-merañ a vez dilennet bep daou vloaz, hag ur c'huzul-evezhiañ a zo bet krouet ganeomp evit ma vo doujet d'hor statutoù, dreist-holl e-keñver orin an arc'hant dastumet ganeomp. Ur c'huzul stur-embann a zo ivez, dezhañ da zibab danvez hon enklaskoù.

a zifenn ar c'hazetennerezh a hir dermen...

War an tu kontrol eus an tabutoù a ra o reuz war platoioù ar chadennoù « keleier penn-da-benn », e labouromp da-vat war doserioù luziet, ha talvoudus evit an holl. Eus saotra-durioù an uzinoù betek ar feulster revel en Iliz katolik, freuz ar c'harzhaoueg, dismantr ar servijoù publik, e kasomp da vat enklaskoù a hir dermen, o sevel skipailhoù kazetennerien gouest da studiañ an aferioù e-pad mizvezhioù ha mizvezhioù.

Ur wech embannet an enklaskoù ganeomp e kendalc'homp da chom war evezh evit degas keleier fresk diwar-benn an aferioù-se, dre hol lizher-kelaouiñ digoust, bep tro ma vez dav.

evit bezañ kaoz eus cheñchamantoù war vat

D'hor soñj n'eo ket ar gazetennnerien arvestourien bennak buhez ar bed. En enep da se ez int aktourien pennañ a gas treuzfurmadur ar gevredigezh. Ar pezh a fell deomp ober eo reiñ ur ster da zarvoudoù hor bed, lakaat war wel ar pezh a fellfe d'an dud galloudus

kuzhat, ha reiñ da c'hoût da bep hini penaos en em zifenn eus ar gwalloberioù war an endro, war an onestiz ha war wirioù mab-den.

Evit se e rank hol labour kazetennerezh enklask bezañ skignet puilh. Setu perak emomp e darempred gant mediaoù lec'hel, broadel hag etrevroadel zoken, evel *France 3 Breizh*, *Reporterre* pe *Mediapart*.

Da-bep-seurt mediaoù e fell deomp kinnig hon enklaskoù da embann, a-benn kizidikaat lennerien ha selaouerien nevez, dre ober gant an abadennoù podkast, video, pe moulladurioù levrioùigoù.

E lec'hioù a-bep-seurt ez eomp da ginnig hol labour war an dachenn, er skolioù, er salioù lies implij, pe er festivalioù, pedet gant kelennerien, levrierien pe kevridegezhioù.

Bevañ a ra Splann ! diwar ho tonezonoù



E 2025 e teue 80 % eus arc'hant *Splann* ! eus an donezonoù, poentek pe miziek, roet hep tamm eskemm ebet gant 3.600 lennerez ha lenner. Deomp eo ur redi evit dont a-benn d'ober al labour kazetennerezh enklask dizalc'h a zifennomp.

O vezañ ma n'hon eus tamm ranndal ebet da resteurel da zen, e c'hell an arc'hant dastumet lakaat hor skipailh skridaozañ da greskiñ. E 2025 neuze, e oa bet gouestlet div drederenn eus hor dispignoù d'ar goproù, dirak ar produiñ videoioù, tresadennoù, stlenngraferezh ha frejoù justis liammet gant hon enklaskoù.

Diouzh ho tonezonoù e vo an dazont. O vezañ ma ra *Splann* ! labour a-laz hollek e c'hellit tennañ betek 66 % eus ho prof diwar ho tailhoù.

Gallout a rit reiñ :

enlinenn dre ar chomlec'h : splann.org/br/archantaouin

gant ur chekenn war anv *Splann* ! : kaset da *Splann* !

Ti ar vro, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Titouroù da gas deomp ?

Titouroù pouezus evit ar gevredigezh 'zo ganeoc'h ? Dokumantoù kizidig pe danvezioù e rankfe *Splann* ! enklask diwar o fennoù ?

Kasit deomp ur postel kentañ gant ur chomlec'h hep hoc'h anv (gant un anv fals ma karit) a-benn displegañ deomp eus petra 'zo kaoz berr-ha-berr. Gwelloc'h eo implijout posteloù evel Protonmail. Respontet 'vo deoc'h penaos ober evit kenderc'hel an tabut ha kas deomp an dokumantoù.

Mont en darempred

contact@splann.org

Splann !, Ti ar vro, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp





Pesketaerezh Breizh o koll ar stur

An enklask embanned e miz Ebrel 2026

An Annelies Ilena a zo anezhañ al lestr-pesketa ar muiañ dekriet er bed. Abaoe 2024 e vez korvoet gant Compagnie des pêches Sant-Maloù. Skoet e voe ar filierenn pa voe postet arc’hant gant an embregerezh en ur ramz war-neuñv ken hir ha 145 metr. Ha klevet e vez ur goulenn : petra a zeuio ar pesketaerezh da vezañ e Breizh ?

Emañ hor feson da besketa oc’h ober e dalaroù, eme lod er porzhioù-mor, ha setu ar pezh a c’hoarvez pa glasker e lakaat da genderc’hel, kousto pe gousto. Lod a sell ouzh al lestr ramzel gant anken evit un amzer-da-zont ma vefe didruez ar pesketa ennañ evit ar vartoloded hag an endro. Mouezhioù disheñvel a glever, ha tenn eo an tabutoù gwezhioù ‘zo. Enkadennoù e-leizh a zo o kas ar pesketa d’ar strad. Grevus eo stad an traoù. Gant an dra-se e sav a-du pep hini.

Diouer a ra ar vartoloded evit sevel akipajoù, ken e chom listri ‘zo er porzh a-wechoù. Evit kavout tud labour ez a ar vestrouiri da vroioù pelloc’h-pellañ da glask martoloded, betek Indonezia. Ar vartoloded nevez-se, a vez lakaet da labourat muioc’h ha ne vezont ket gwarezet gant ar sindikadoù, o deus riskloù bras da vezañ korvoet. Diskouez a reont emañ ar vicher o cheñch da vat.

Diouer a ra ar pesked er mor ivez. Ar brizhilli, da skouer, a zo bet pesketaet betek re hag aet int war-zu an hanternoz gant direizhamant an hin. An artizaned vretton n’o deus ket ar gwir da bakañ anezho ken, pe dost. Diskouez a reont penaos e vez rastellet ar gwirioù da besketa gant embregerezhioù liesvroadel. E Breizh e vez gwelet gant ar Scombrus, chaluter modern-kenañ an armatour France Pélagique.

Difioù e-leizh a zo hag un ostilh a vez e-kreiz ar jeu : ar roued-stlej don, a vez anvet chalu don ivez. Anv ‘vo eus ar Vro Vigoudenn, rak eno emañ al lodenn vrasañ eus al listri a ra gant an ostilh-se. Daou dra az a a-dreuz evit ar chaluterioù hiziv : bevennoù ekologel ar rouedoù-stlej, a vez meneget abaoe pell, ha bevennoù ekonomikel ur mod da besketa a implij kalz energiezh pa ‘z eo kresket he friz a-galz abalamour d’ar brezel en Ukraina hag en Iran bremañ.

Un enkadenn zemokratel an hini a zo deuet da heul cheñchamantoù ar filierenn. Kalz mouezhioù o deus an embregerezhioù liesvroadel en ensavioù a c’houarn ar vicher. Kavout a ra d’ar besketaerien artizaned ne vezont ket selaouet pa vez graet divizoù bras, padal e labouront evit ur pesketaerezh a zouj muioc’h ouzh an endro. Se ‘zo kaoz ez eo ken diaes d’ar besketaerien soñjal en o doareoù d’ober ha cheñch anezho.

Robin Bouctot, Catherine Le Gall

LODENN 1

LABOURAT ER PESKETAEREZH : HA DIDRUEZ E VO AR PATROM ?

.....pajenn 11



Martoloded o tont eus broioù pelloc'h-pellañ, a vez gopret gant kalz a vestrouiri eus Breizh. Akipajoù marc'had-mat eo evito, a vez lakaet da labourat muioc'h eget ar re all. Daoust hag e talvez emañ ar pesketa o kemm da vat ?

LODENN 2

AR BRIZHILLI O VONT DA GET : LOBIOÙ INDUSTRIEL HA DISKAR AR PESKETAEREZH ARTIZANEL

.....pajenn 21



Meur a vil tonenn pesked a vez sachet gant un dornad listri ezel eus paramantadurioù bras eus Breizh, ha pesketaerien an aodoù a geuz gant digresk o gwir da besketa. Ar brizhilli a zo deuet da aroueziañ an enkadenn-se, a oa bet adwelet o c'houtoù gant an UE.

LODENN 3

DAOUST HA PAOUEZET E VO DA CHALUIÑ

.....pajenn 31



Burutellet eo bet ar pesketa gant rouedoù-stlej abalamour d'e efedoù war an endro. Ha bremañ e vez lakaet en arvar peogwir n'eo ket ampletus a-walc'h. Daoust ha mont a ray da get ? Deomp da borzh marilh ar Gelveneg, lec'h m'eo kozh istor ar chaluterien.

LODENN 4

PESKETAERIEN ARTIZANED LAKAET MAEZ EUS AN DIVIZOÙ

.....pajenn 43



Arc'hant, gwiraourien ha pouez politikel o deus an embregerezhioù liesvroadel. Ar besketaerien artizaned, eus o zu, a sav o mouezh hep bezañ klevet. Ha diskouezet o deus ensavioù dilennet ar pesketaerezh ne zeuent ket a-benn da lakaat ar filieren da vont war-raok.

Petra eo Splann ! ?

Ar media kentañ gouestlet penn-da-benn d'an enklaskerezh e Breizh eo *Splann!*. Renet eo gant ur spered dizalc'h ha nann-genwerzhel. Krouet eo bet e 2020 gant ur strollad kazetennerien a zifenne ar frankiz da gelaouiñ diwar-benn an agro-industriezh. Ledanaet zo bet ar sujedoù enklask : kudennoù yec'hed, endro, reizhded ha frankizoù foran. Hep bruderezh, perc'henned, pe skoazelloù ar gouarnamant lec'hel. Kontrolled eo ar media *Splann!* gant e izili hepken, kazetennerien dreist-holl, hag arc'hantaouet gant ar pezh a ro an lennerien ha lennerezed deomp.



*An enklask-mañ a c'hellfe bezañ astennet gant pennadoù all.
Skanit ar c'hod QR-mañ.*

Heulit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial:



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann



splann.bsky.social



@splann@mamot.fr



splannenquetes




« Splann ! » :
quotidien d'enquête



« Splann ! » :
quotidien d'enquête

LABOURAT ER PESKETAEREZH : HA DIDRUEZ E VO AR PATROM ?

Martoloded o tont eus broioù pelloc'h-pellañ, eus Indonezia peurgetket, a vez gopret gant kalz a vestrouiri eus Breizh. Akipajoù marc'had-mat eo evito, a vez lakaet da labourat muioc'h eget ar re all, pell eus ar sindikadoù na aozont ket labourerien ar mor ken. Daoust hag e talvez emañ ar pesketa o kemm da vat ?



Damien Roudeau

- ▀ Lakaet eo bet micher a vartolod war roll ar micherioù ma ra diouer al labourerien enno e miz Mae 2025, ar pezh a aesa tuta martoloded e-maez Europa.
- ▀ 163 martolod indoneziat war vor a veze kontet e 2021, pa oa 7 anezho e 2017. Dont a ra Indonezia da vezañ gant Senegal, unan eus ar broadoù bras o kas martoloded da Vro-C'hall.
- ▀ Goullo eo chomet plas ar sindikalourien ha drougimplijoù a c'hoarvez. Muioc'h c'hoazh pa vez digresket arc'hant Inspekterezh al Labour Mor.



Damien Roudeau

Edo ar barradoù-glav-pil o veu-
ziñ ar pesked er porzh-mor-se
eus ar Vro Vigoudenn. Den
ebet ne veze gwelet war ar
c'haeoù, ha didrouz pontoù ar bigi.
War unan, avat, e veze klevet sone-
rezh kafunet, ur vag-rouedañ war-dro
ugent metrad hirder, an hini nemeti
ma veze gwelet gouloù enni dre al lom-
berioù. War vord edo ur mekanikour
portugalat, tri martolod indoneziat ha
kilometradoù a rouedoù berniet, uzet
gant mizvezhioù merluzeta. Dresañ a
raent anezho pizh gant nadozioù.

« E-pad c'hwec'h miz well-wazh e vezomp
war-vourzh o labourat, goude-se ez eomp
en-dro da Indonezia da gaout hor familh,
ha war-lerc'h e teuomp en-dro war ar
vag, hag all », a zispleg berr-ha-berr
unan eus ar vartoloded indoneziat,
Danga, 33 vloaz. Spagnoleg podoù a

vez komzet gantañ. Ar yezh voutin
eo war ar vag, lec'h n'ez eus paperioù
gall nemet gant ar c'habiten hag ar
penn-mekanikour. « N'eus nemedomp
a vez o chom war hor bag er porzh-mañ.
Mont a ra, met gwelloc'h eo din bezañ
war vor o labourat, n'em eus ket kement
a amzer evit soñjal. Hag amañ e Breizh
e vez yen ha gleb an amzer », emezañ
gant keuz, o vousec'hoarzhin memes
tra. « Pegement eo ar gopr ? N'ouzon ket
re, kaset e vez d'am familh diouzhtu, met
mat eo. Mat eo ar mestrouer », emezañ o
sevel e viz-meud.

PAEET HERVEZ O BROADELEZH

« Ur wech an amzer e feurmomp un
Airbnb dezho, p'o deus ezhomm da
ziskuizhañ. Kalz gwashoc'h a zo, n'eo ket
sklaverezh eo ! », eme ar c'habiten ouzh
ar pellgomz. Kuitaet en doa ar vag un

nebeud devezhioù a-raok evit mont d'ar gêr da ziskuizhañ e-pad ur mizvezh.

« *Tud ar vro ne fell ket dezho labourat, tud ar Senegal 'fell ket din klevout anv anezho, hag ar Bortugaliz 'zo kozhet. Ma vije bet Indonezidi evel da re dek vloaz 'zo e vijemp bet o sevel bigi nevez hiziv c'hoazh, setu pezh 'lavare un armatour eus ar vro Vigoudenn din n'eus ket keit-se 'zo* », emezañ c'hoazh.

Chom a ra war ur marteze pa vez anv eus ar gopr a vez paeet d'e vartoloded, met anzav a ra ez eo « *un tammig izeloc'h* » gopr an Indonezidi eget hini ar peurrest eus an akipaj. Dezho ne vez ket roet o lodenn eus ar peskerezh ur wech m'eo bet gwerzhet, evel ma vez graet gant ar re all atav. Gant an doare-se e c'hell ar besketaerien kaout goprou mat-tre pa vez graet pesketaerezh mat – hag ar c'hontrol pa vez fall ar marevezh. Heñvel e vez o gopr dezho bewech, en o c'holl, a soñj d'ar vorae-rien dre vras.

« *Arc'hant bras eo evita* », eme mestr ar vag. Mat eo dezhañ e chomfe ar vartoloded eus Azia war vourzh e-pad o mizvezh ehan evit adober ar stokoù ha kempenn ar rouedoù, peogwir int « *kustumet d'ober e mod-se* ». « *Pell 'zo e labouromp gant Indonezidi war al listri gall-ha-spagnol* [gall o banniel-mor,

« Un dra nevez eo gwall zispartiañ ar vartoloded evit o gopr e mod-se war ur vag gant ur banniel gall. »

met spagnol o c'hapital¹, NGAS], *met o paouez en em gavout e Breizh emaint* », emezañ, laouen.

War evezh e vez lakaet Patrick Chaumette, kelenner emerit war gwir ar mor e skol-veur Naoned, gant skouer ar goprou disheñvel roet d'ar vorae-rien hervez o broadelezh. « *Un dra nevez eo gwall zispartiañ ar vartoloded evit o gopr e mod-se war ur vag gant ur banniel gall. Daoust ha maez-lezenn eo ? Prest on da lavar ya* », eme an arbennigour. Seurt doareoù ne gaver ket kalz a deulioù diwar o fenn, hag en em c'houlenn a ra ha kustum

1] « Pourquoi ces navires de pêche franco-espagnols sont-ils immatriculés à Lorient ? », Olivier Cléro, *Ouest-France*, 24 a viz Gwengolo 2025

Indonezia, an eil broadelezh war ar bigi-pesketa e Frañs, goude ar Senegaliz.

eo, met soñj a ra dezhañ emaint war-nes kreskiñ, « *moarvat* ». Prest eo pep tra, a gav dezhañ. Ar memes tra a zo bet merzhet gant an ITF, sindikad etrebroadel an dud a vor. Goulennet o deus gantañ kemer perzh en un enklask diwar-benn korvoiñ al labourerien estren er pesketaerezh e bro-Spagn, o kinnig e sell war ar pezh a c'hoarvez e Frañs.

NIVERUSOC'H-NIVERUSAÑ AR VARTOLODED ZIVROET

N'eo ket un dra nevez e vefe labourerien estren. Bloavezhioù 'zo e kaver martoloded eus Senegal, eus Portugal

pe eus Polonia war ar cha-luterioù, ar bigi-kregina, ar bigi-rouedañ, kement hag al listri armet evit pesketa en donvor – daoust ma ne vezont ket klevet kalz. Estren e oa 9,1 % eus ar vartoloded a labour e Breizh e 2024, hervez sifroù diwezhañ Pennrenerezh an afe-rioù-mor, ar pesketaerezh hag ar gouniderezh-dour, meneget er gelaouenn *Le Marin*².

Met anatoc'h-anatañ eo an traoù er porzhioù-mor. Gwelet e vez diouzhtu er strolladoù tuta e Facebook, a vez graet kalz ganto evit

kavout martoloded war ar prim. Dindan ar c'hinnigoù labour hag ar goulennoù erlec'hiañ ur moraer a-greiz-pep-kreiz e teu respontoù eus Senegal, Maroko, Madagaskar, hag aliesoc'h-aliesañ, eus Indonezia.

163 martolod indoneziat war vor a veze kontet e 2021 gant an Ocapiat³ (un arsellva a zo e gefridi pourchas roadennoù da c'hennad ar pesketaerezh), pa oa 7 anezho e 2017. N'eus ket a stadegoù evit 2026, rak paouezet eo bet gant an arsellva. Niverusoc'h-niverusañ e teuont da vezañ, avat, eme Axelle Bodmer, e karg eus an implij evit an UAPF, sindikad

2] « Un sur dix : les marins étrangers essentiels au bon fonctionnement de la pêche en Bretagne », Franck Jourdain, *Le Marin*, 27 a viz Kerzu 2025

3] « Rapport national 2021 », Observatoire prospectif des métiers et des qualifications de la pêche, miz Kerzu 2022

pennañ ar vestrouiri. Sur eo-hi eo deuet Indonezia da vezañ « *hep mar na marteze* » an eil broadelezh war ar bi-gi-pesketa e Frañs, goude ar Senegaliz.

EN ANV AR PRIZIOÙ DA LAKAAT DA ZIGRESKIÑ

Diaes eo tuta labourerien eus ar vro, eme an holl vestrouiri hon eus kejet outo evit an enklask-mañ, keuz enno alies. Gant an ensavadurioù e vez lavaret ar memes tra. Kozhet ar vartoloded ha n'eus ket bet stummet a remziad yaouank, ne vez ket desachet an dud gant ar vicher ken, mont a ra priz ar bigi war-gresk ha ret eo ober dleoù bras, tenn eo an aozioù labour, izeloc'h eo gounidoù ar pesketaerezh eget ma oant gwechall : war an holl borzhioù-mor e klever ar memes traoù, ha teñval int.

Embann a ra an aozadurioù miche-rel e labouront evit cheñch an traoù : youl a vez lakaet ganto evit desachañ tud yaouank⁴ ha stummañ anezho. Hag en a-dreñv e klaskont kaout reolennoù soubloc'h evit tuta moraerien estren. « *Hepto e chomfe muioc'h-muiañ a vigi er porzh* », eme gKenatea Chavez-Hey, mouezh aotreet France Terre de

Pêches. Lavaret he deus deomp dre bellgomz e veze graet ul labour a lobyng gant ar strollad nevez-se, a vofe, emezo, en tu all da 1.000 embregerezh pesketaerezh.

An UAPF, mouezh ar vestrouiri, a labour evit ar memes tra. Oberiant eo bet nevez-zo evit ma vefe lakaet ar vicher a vartolod war roll ar micherioù ma ra diouer al labourerien enno⁵ (« *métiers*

en tension ») gant ar Stad. Aesoc'h eo neuze tuta martoloded o tont eus broioù maez eus Europa. Un dra gizidik ha pouezus all da echuiñ : Axelle Bodmer a lavar deomp e fell da veur a baramantour ne

**Renkañ ar vicher
martolod
evel micher
« en tension »
aesaat a ra tuta
martoloded
e-maez Europa.**

vefe ket difennet ken ober gant servijoù prevez evit an tuta hag ar c'hask postoù-labour er pesketaerezh : ar manning. An armatourien a abeg o deus « *ezhomm da gavout labourerien diouzhtu* » war o bigi hag e rankont bezañ « *kevezus* » war marc'had bedelaet ar pesked.

« *Kevezañ a reomp ouzh paramantourien eus broioù europat all na baeont ket o martoloded ken ker, pell a se* », eme zDavid⁶, a labour evit un armatour bras eus Breizh. « *Izel-tre eo ampletusted ar pesketaerezh, hag ober gant tud labour izel*

4] « Pêche et jeunesse : un métier qui recrute », kemennadenn Instagram diwar ar gont @ France_terredépêches

5] « Arrêté du 21 mai 2025 fixant la liste des métiers et zones géographiques caractérisés par des difficultés de recrutement en application de l'article L. 414-13 du code de l'entrée et du séjour des étrangers et du droit d'asile », Journal officiel n°0119, 22 a viz Mae 2025

6] Cheñchet eo bet anvioù an dud pa vez skrivet o anv-bihan hepken

« Ober gant tud labour izel o c'houst a zo unan eus an doareoù nemeto da lakaat ar c'hargoù da zigreskin. »

o c'houst a zo unan eus an doareoù nemeto da lakaat ar c'hargoù da zigreskiñ », emezañ c'hoazh. « Reolennoù 'zo a c'hellfe bezañ adwelet. Paeañ skodennoù da surentez sokial ar vartoloded, evit an Indonezidi, arabat mont re bell », eme ouzhpenn un armatour, a fell dezhañ chom dizanv.

« Emaint o lavar ar memes traoù diwarbenn ar prizioù da zigreskiñ hag e raent er verdeadurezh a genwerzh er bloavezhioù 1980, evit ma vefe skañvaet ar reolennoù sokial », eme bPatrick Chaumette. « An disoc'h a zo bet gwelet : traoù a vez difennet war an douar peogwir int gwall-ziforc'hioù a vez reizh hervez lezenn pa

vezer war vor. [War ar bigi gall] e vez tretet ar vartoloded e modoù disheñvel-tre hervez o broadelezh pa vez anv eus o gwarez sokial, eus pegen pell e chomont war vor, eus an ehanoù gopret, eus ar c'hendivizoù, war ar goproù da skouer, hag all hag all. »

SINDIKAD EBET KEN

Un elfenn all a ranker soñjal enni pa vez anv eus riskloù ar paramantiñ : n'eus sindikad ebet ken evit difenn ar voraerien, pe dost. « N'eus ket kalz a dud evit difenn ar vevelien tiegezh, met gwelloc'h eo eget war vor memes tra », eme Fabien Clouette, antropologour arbennik war ar pesketaerezh.

Bet e oa war vor war chaluterioù eus Breizh evit e enklaskoù, ha gwelet en doa ar sindikadoù o vont eus sindikadoù labourerien da sindikadoù mistri tamm-ha-tamm. Un efed eus ur pesketaerezh n'eo ket industriel ken e Breizh, eme Yves l'Helgouach, ezel brudet eus sindikad CGT ar vartoloded abaoe ar bloavezhioù 1980, hag en deus dilezet e gargoù er sindikad e 2024.

« Gwechall e oa sendiket an akipajoù hag asambles e c'hellemp ober traoù a-stroll e-tal an armatourien. Tud a oa e-tal deomp evit marc'hata. Bremañ n'eus ket mui, pa n'eus ken nemet ar pesketa gant

an implijer war ar vag evel mestrouer, hag hennezh eo ivez an hini 'zo kannad ar sindikad. Nebeutoc'h-nebeutañ a labourerien sendiket a zo, ha muioc'h-muiañ a labourerien estren, indoneziat peurgetket – hag ur vezh eo se. Diaes-tre e teu an traoù da vezañ, neuze. Hag an armatourien vras a zo c'hoazh, n'eus ket kalz anezho, ha profitañ a reont eus ar gwir da dremen frank hag eus ar reolennoù europat evit ober ar pezh a fell dezho evit ar reolennoù sokial hag an implij. »

Goullo eo chomet plas ar sindikalourien ha setu an drougimplijoù a c'hoarvez, rak lec'hioù kloc'h eo ar bigi-pesketa, na vezont ket gwelet ha n'hellont ket bezañ kontrolet. Diaes 'vefe mont da gontroliñ ur chaluter dre souezh e-kreiz Mor Breizh. Serret an nor war ar vartoloded atav. Riskloù bras a zo, ha padal « *n'en deus ket mui Ensellerezh al labour war-vor peadra d'ober e vicher* », eme c'hoazh ar c'helenner Patrick Chaumette. Re a draoù o deus an ensellerien d'ober evit sellet ouzh aozioù labour ar vartoloded. Riskloù bras⁷ a zo e vefe gouezet peseurt buhez o deus war vor pa vez gwallzarvoudoù grevus. Ensellerezh al labour n'en deus ket respontet d'hor goulenn atersadenn.

« *Ouzhpenn da se, ar vartoloded n'o deus*

Goullo eo chomet plas ar sindikalourien ha drougimplijoù a c'hoarvez.

ket amzer da reiñ mouezh pa vezont en aod, ha gant an nec'h da goll o labour e vefent forzh penaos », eme an enklasker Fabien Clouette, a gav dezhañ ez eo ar pesketa « *ur sistem klok lec'h ma vez da vuhez en da vicher. A-hed an amzer e veze gant 4-5 paotr en ul lec'h kloc'h, a zo ul lazhti bihan war-neuñv anezhañ memes tra, e karter 'vezez alies-tre, ha lous-brein dizehan, kousiet gant gwad ha stripoù, kousk a rez en ur gwele leun a zour... Ha pa zilestrez evit un devezh pe zaou e teu ar mestr-bag da c'houlenn ganez dont da labourat en-dro evit prientiñ ar marevezh da zont* », a gont an den en deus bevet kalz war vor evit e labour enklask. « *Gwelet em eus bet paotred a lestre hep kevrat ebet ha reoù all a veze dirollet goude marevezhioù diaes-spon-tus hep bezañ paeet. Bihan-bihan eo bed ar pesketaerezh, setu an istorioù-se a dalvez traoù.* »

7] « Naufrage du palangrier Maria Reina Madre, le 09 février 2024, au large de Pasajes », danevell enklask, Ofis an Enklask war an Darvoudoù Mor, miz Ebrel 2025



Damien Roudeau

« MAT EO DEZHO KOUSKET N'EUS FORZH PELEC'H »

« Pa oa degouezhet an Indonezidi gentañ war vourzh em boa klevet trouz spon-tus gant martoloded an akipaj », eme Jérôme, ur mestrouer breizhat en doa gopret martoloded eus Azia. « Met ur sizhunvezh goude-se e oa bet graet ur soñj all da vat gant ar c'habiten. Laouen-tout e oa : pep tra a c'helle goulenn ganto ha pep tra a raent. Jentil-tre int, a-du 'vezont gant pep tra, ha gant o is-torioù-buhez 'vezont prest da ziwaskañ kalz muioc'h eget tud ar vro. »

« Er pesketaerezh e c'hoarvez ar memes tra hag en tiez-lazhañ. En em sakrifiañ 'ra ar vartoloded pa zeuont da Frañs, prest

« Pep tra a c'helle goulenn ganto ha pep tra a raent. Jentil-tre int, a-du 'vezont gant pep tra. »

int da ziwaskañ traoù tenn e-pad un nebeud bloavezhioù evit espern arc'hant a-raok mont d'ar vro en-dro da chom », eme Sylvain, moraer eus Sant-Maloù anezhañ. Doñjer en deus ouzh ar mod ma vez gwalldretet lod eus e gen-seurted, ha gant an diasur ma 'z eo al

labourerien estren abalamour d'ar ouen-nelouriezh. « N'eus ket keit-se 'zo e oa daou Senegalat a gouske war al leur en o seier-kousket er c'hoc'hu-pesked e Sant-Maloù.

Karavanennoù brein eo 'vez prestet da lod all, tra ebet gwelloc'h. » Evit ur stal paramantiñ bras eus Breizh emañ David o labourat. « Alies-tre » en devez kinnigoù gant ajañsoù manning indoneziat. « Martoloded paeet gant

gopr izek an OMI⁸, 600 da 800 € dre viz a ginnigont din. Eüruzamant ez eo difennet e Frañs... betek-hen », emezañ o hirvoudiñ.

Gant ajañsoù manning indoneziat omp bet e darempred dre Whatsapp ha Messenger evit an enklask-mañ. Skrivet o deus deomp e oa unan eus o falioù mont e-barzh marc'had Frañs, pagav dezho emañ o tigeriñ. Oberiant-tre eo « El Vano » gant an armatourien vreizhat. Al lesanv-se eo hini un hanterour a ginnig martoloded indoneziat prest da labourat « *gant ur viza evit Frañs ha skiant-prenet war listri a bep seurt* ». Meur a vartolod a zo bet kaset da Frañs gantañ dija, emezañ. « *Evit ar bod, mat eo dezho kousket n'eus forzh pelec'h, en ur ranndi pe war ur vag, prest int evit pep tra* », a skriv-eñ da Splann ! c'hoazh e Whatsapp. Sur eo « *ne vo kudenn tud labour ebet ken [gant ar baramantourien] gras d'ar vartoloded indoneziat. Al lodenn vrasañ anezho a labouro ur bloavezh-pad, ha goude-se ez int daou vizvezh da vakañsiñ.* » Tud labour prest da labourat n'eus forzh pegoulz, pe dost, ar pezh a fell da galz mestrouiri kaout.

HOLLC'HALLOUDUS AR MESTROUER

Labour ret ha feulster a zo bet andur ret gant kalz martoloded indoneziat a-raok en em gavout e Frañs. Dielloù niverus a ziskouez kement-se war listri sinaat⁹ ha taiwanat¹⁰. Roet e vo skouer Pamuji, ur pesketaer indoneziat anezhañ. « *Gant ma ajañs manning e oan bet kaset da labourat war listri e Taiwan, met diaes-tre e oa* », a skriv-eñ e Messenger.

Lestret e voe war ur vag-rouedañ eus mervent Frañs goude. En Orient e tilestre alies evit skarzhañ strad al lestr etre daou varevezh. Dic'hopret eo bet an den a 33 bloaz goude un nebeud mizvezhioù diskuizh en Indonezia. Padal en doa promet e vestrouer lestrañ

**« Er
pesketaerezh
e c'hoarvez
ar memes
tra hag en
tiez-lazhañ. »**

anezhañ en-dro. « *Nullet en deus ac'ha-non trumm, un nebeud devezhioù a-raok an deiz ma oan da zont en-dro, peogwir en doa kavet unan bennak all evit labourat em lerc'h. Met kontañ a raen war ma labour war e vag evit skoazell ma familh ha gantañ emañ ma faperioù labour. Penaos e rin bremañ ?* », eme gant anken an den en deus spi da adkavout labour e Frañs.

8] « L'organe de l'OIT adopte un nouveau salaire mensuel minimum pour les marins », kemennadenn d'ar gazetennerien, Aozadur Etrebroadel al Labour, 18 a viz Mae 2022

9] « Deadly conditions for Indonesian migrant crews tied to illegal fishing », Basten Gokkon, Leurenn kelaouiñ Mongabay, 6 a viz Genver 2020, pajenn internet gwelet e miz Kerzu 2026

10] « US Department of Labor: Fish from Taiwan is caught with forced labor », kemennadenn d'ar gazetennerien, Tanya Brooks, Greenpeace, 6 a viz Kerzu 2024, pajenn internet gwelet e miz Kerzu 2026

« 17.000 € well-wazh 'm eus bet evit ur bloavezh labour en Europa. » Un tammig ouzhpenn da 1.400 € dre viz, neuze. Un druez eo, evit ken diaes ur vicher.

« *Armatourien 'zo a brofit eus an diouer a labourerien evit lakaat gwask war ar reolennoù sokial pa vez martoloded nevez o doare o tont* », eme ar c'helenner Patrick Chaumette, a selaou mat ouzh ar pezh a lavar ar vistri. « *Hegar eo lod anezho. Lod all, avat, a brofit eus tud labour nevez a zo 'marc'had-mat'.* »

Labourerien a lakaont da labourat a-lazh-korf ha prest da asantiñ da aozioù-labour fall-tre. Diaesoc'h e c'hellfe bezañ da dud yaouank al liseoù

micherel mor kavout labour pa vez gopret martoloded indoneziat gant ar vestrouiri, kentoc'h.

Diverrañ an traoù a ra un den a labour evit ur armatour bras : « *E-kreiz ar rou-dour emamp er pesketaerezh. Emañ ar pesketa er morioù don o kouezhañ da vat. Daoust hag e c'hoarvez an traoù gant dale pa groger d'ober gant ar manning ha da lakaat martoloded indoneziat da labourat ? Pe daoust hag emañ ar gennad oc'h en em aozañ war ur patrom didruez, un doare kapitalouriezh kriz lec'h ma vo korvoet an dud betek penn evit chom ampletus ?* »

Robin Bouctot

AR BRIZHILLI O VONT DA GET : LOBIOÙ INDUSTRIEL HA DISKAR AR PESKETAEREZH ARTIZANEL

Meur a vil tonenn pesked a vez sachet gant un dornad listri ezel eus paramantadurioù bras eus Breizh, ha pesketaerien an aodoù a geuz gant digresk o gwir da besketa, o micher lakaet en arvar hag an danvez a ra diouer. Ar brizhilli a zo deuet da aroueziañ an enkadenn-se, a oa bet adwelet o c'houtoù gant an UE d'an 30 a viz Meurzh 2026, gant ar riskl da gouezhañ ar spesad.



Damien Roudeau

- 】 Dre ma vez pesketaet ar brizhilli betek re, eo bet digresket ar c'houtoù – ar c'hementadoù pesketa aotreet – met kresket eo bet war lec'h, a-enep d'ar c'hemennadennoù skiantel.
- 】 Diwar istor ar pesked paket gant an armatourien etre 1973 ha 1983 lodennont ar c'houtoù.
- 】 Ar re a beskete kalz hanter-kant vloaz 'zo eo ar re o devez atav ar gwir da besketa ar muiañ hiziv.



Damien Roudeau

Linennnañ, higennañ ha sevel un nebeud kevell a ra Christian gant e vag 8 metrad hirder en hanternoz Penn-ar-Bed. N'eus mod all ebet da besketa a vefe muiañ dizañjer evit ar pesked ha strad ar mor eget e hini, gant meur a deknik. E 2024 e teue 80 % eus e sifr berzh eus ar brizhilli. 8 tonenn en doa tennet eus ar mor, neuze. Met bloavezhioù 'zo e vez ar skiantourien o lakaat da ziwall, rak digreskiñ a ra a-galz an niver a besked arc'hantek er mor.

Tost d'ar « poent terriñ » edo ar spesad e 2025 rak pesketaet e oa bet betek

re, hervez ar c'huzul etrebroadel evit enklask ar mor¹ (CIEM). Se 'zo kaoz da Stadoù Europa² bezañ divizet digreskiñ ar pakañ da vat. Ha setu deuet ar sifroù evit 2026 : aotreet eo Christian da besketa 25 kilo bemdez d'ar muiañ, 100 kilo bep miz. Skoet eo, e batrom ekonomikel gantañ. « *Gant priz ar gaezeoul, 'dalv ket ar boan mont war vor ken* », emezañ. « *Prenet 'm oa peadra d'ober ar vicher brizhilli pa oan bet skoet da vat e 2024 pa oa bet difennet mont da levnegeta*³. *Petra y in da besketa bremañ ? Tra ebet ?* », emezañ ouzh taol e gegin, e vanne kafe gantañ. « *Padal e welan ar*

1] « ICES Advice on fishing opportunities, catch, and effort Ecoregions in the Northeast Atlantic and the Arctic Ocean », ICES / CIEM, 30 a viz Gwengolo 2025

2] « Possibilités de pêche pour 2025 dans les eaux de l'UE et dans les eaux n'appartenant pas à l'UE: le Conseil parvient à un accord », Kemennadenn d'ar gazetennerien, Kuzul Unaniezh Europa, 11 a viz Kerzu 2024

3] « Quotas 2024 : les pêcheurs entre colère et incompréhension », Mélanie Chartier, *Le Marin*, 26 a viz Kerzu 2026

*pesked en ma zakadoù peske-
ta ! Met n'int ket evit ar beske-
taerien vihan, war a seblant. »*

CHALUTERIEN

A RANK TEUREL PESKED DREIST AR BOURZH

Kreñvoc'h eo deuet soñj Christian d'an 12 a viz Genver 2026. Un notenn guzh gant ar From Nord, aozadur galloudusañ ar beske-taerien c'hall, a oa bet diskuliet d'an deiz-se gant an ONG Bloom⁴, a stourm hardizh ouzh ar « pesketaerezh industriel ». Enni e embannont ar mod ma vo meret ar brizhilli e-pad mizvezhioù kentañ ar bloaz.

Drouklaouen eo pesketaerien an aodoù gant reolennoù an dasparzhañ. 4 % a vrizhilli, da lavaret eo 40 tonenn bep sizhun hervez jedadennoù Bloom, eo aotreet ar Scombrus hag ar Prins Bernhard da gaout e strad o lestr. An daou chaluter-skornerez bras-divent a zo perc'henn an embregerezh France Pélagique (ur filieren eus ar strollad izelvroat Cornelis Vrolijk) warno a vez anvet « Ankoù ar mor » er c'hazetennoù a-wechoù⁵.

Nac'hañ ar sifroù-se en deus graet Geoffroy Dhellemmes, penn-rener France Pélagique, dre bostel. « 60 gwech well-wazh dindan ar c'hementadoù

En Izelvroioù, e vez diskarget tout ar pesked a vez paket gant France Pélagique.

meneget » e vefe pouez ar pesked a vez tapet ganto. Daou chaluter all a besket kalz brizhilli o deus ar gwir da dapout 4 zonenn bep sizhun. Ouzh ar bigi all e vez difennet, pe kazi-difennet, brizhillia. Rivinet int.

War ar chaluterioù e rankont teuler ar pesked dreist ar bourzh, enta. Padal int marv-tout p'en em gavont war o font. « *Un druez eo, distruj a reomp evit netra* », eme Aurélien, kabiten ar Jajane, ur chaluter a 12 metr marilhet e Sant-Ke-Porzh-Olued (Aodoù-an-Arvor).

ARC'HANT BRAS E MOR AN HANTERNOZ

Gant cheñchamant an hin ez a spesadoù 'zo evel ar brizhilli d'an hanternoz da chom, war-zu an Inizi Faero, an

4] « Exclusif : un document révèle le choix des autorités de sacrifier la pêche artisanale au profit de navires-usines géants », Kemennadenn d'ar gazetennerien, Bloom, 12 a viz Genver 2026

5] « La France lance un chalutier géant « fossoyeur des mers » », Guy Pichard, Jérôme Derigny, Reporterre, 26 a viz Gwengolo 2020

« Laeret e vez ar pesked evit luskoù arc'hant. »

Island ha Norvegia. Brasoc'h-brasañ eo ar c'hotaioù kemeret gant ar broioù-se, rak niverusoc'h eo ar pesked dirak o aodoù. Unaniezh Europa, eus he zu, a zalc'h gant he doare istorrel da reiñ kotaioù. Pell ez a ar c'hotaioù en tu all d'ar pezh a vez aliet gant ar skiantourien, enta, ha re a besked a vez paket.

« *Ar re vras a besket milionoù a donennoù eno, distruj an danvez a reont e mor an Hanternoz hag e mor Breizh, hag artizaned ar vro n'o deus ket droad da vont war vor ken* », eme Jérémie Gourmet, kabiten ur boliñcher er Vro Vigoudenn. Berzet eo outañ brizhillia evit ar mizvezhioù o tont, padal e rae kalz eus e c'hounidegezh gant ar pesked arc'hantek paket en e roued-tro o tont e penn-kentañ 2026.


Fuloret eo ar mestrouer ivez rak en Ijmuiden, en Izelvroioù, e vez diska-rget tout ar pesked a vez paket gant an daou lestr-uzin a zo perc'henn

Damien Roudeau



France Pélagique⁶ warno. Ezporzhiet e vezont goude, war-bouez un nebeud dregantadoù a vez kaset da Frañs en-dro. « *3 % well-wazh, dre friturioù e Portugal hag e Spagn* », en deus lavaret penn-rener an embregerezh deomp. Kadarnaet en deus un dra bennak all ivez : kement pesk a vez paket gant e listri a vez prenet goude ha lakaet war ar marc'had gant an embregerezh liesvroadel hollandat perc'henn war ar paramantiñ, Cornelis Vrolijk.

6] Teuliad kelaouiñ kinnig gant France Pélagique



Arouez ur sistem klañv eo ar brizhili, hervez Dimitri Rogoff, prezidant Poellgor-rannvro ar pesketaerezh hag ar sevel loened-mor e Normandi. « *Laeret e vez ar pesked evit luskoù arc'hant* », emezañ. Evit ar bloavezh 2024 e embanne laouen ar strolad izelvroat Cornelis Vrolijk⁷, a ren France Pélagique, e oa kresket e sifr berzh dre 5,5 % hag aet e c'hounid war-raok da liveoù na oant ket bet tizhet james.

UR SISTEM DIFIÑV EVIT INTEREST AL LISTRI BRASAÑ

Evit kompren stad an traoù e ranker anavezout teir reolenn merañ bras a ren labour ar besketaerien vreizhat. Ar reolenn gentañ a vez divizet e live Europa, lec'h ma vez lodennet an holladoù pakañ degemeret etre ar Stadoù ezel. Bep goañv ez en em gavont e Brusel gant skiantourien ar c'huzul etrebroadel evit enklask ar mor (CIEMegallegpeICESe saozneg),

7] « Feestelijke winsten voor IJmuidense visgigant Cornelis Vrolijk », Tim Jansem, Quote, 3 a viz Genver 2026, pajenn internet bet gwelet e miz Even 2026

a zo karget da reiñ alioù war emdroadur ar stokoù pesked. Asambles e sel-lont ouzh stad an danvez er morioù.

Diwar istor ar pesked paket gant an armatourien etre 1973 ha 1983 lodennont ar gwirioù da besketa. Gant gerioù all, ar re a beskete kalz hanter-kant vloaz 'zo eo ar re o devez atav ar gwir da besketa ar muiañ hiziv. An eil reolenn a ya da heul an hini gentañ, ha cheñch a ra e pep bro. E Frañs e vez ingalet ar c'hotaioù-bloaz etre an aozadurioù produerien. Diwar bloavezhioù kozh e vez graet an ingalañ ivez⁸, rak ar bloavezhioù 2001, 2002 ha 2003 eo ar re a ra dave.

Pep aozadur produerien en deus e reolennoù dezhañ goude evit lodennañ ar c'hota etre listri e izili. Ar mod ma reont n'eo ket splann atav, ha kalz pesketaerien hon eus ket jet outo a damalle ouzh aozadurioù 'zo mont en-dro en ur mod kuzh.

En o zouez emañ ar From Nord, un aozadur war-dro 150 lestr ennañ, evel re an embregerezh France Pélagique, an daou ramz a vern ouzhpenn da 50 % eus ar c'hota broadel evit ar brizhilli, hervez Bloom. Meur a wech omp bet e darempred gant ar From

Nord, met n'o deus ket asantet ober ur pennad-kaoz ganeomp. Geoffroy Dhellemmes, penn-rener France Pélagique, en deus nac'het rannañ sifroù kozh ar pesked paket gant e listri p'hon eus graet ar goulenn gantañ, o venegiñ e oa « *kuzhut* » ar roadennoù. Festival kentañ ar pesketaerezh artizanel a oa bet dalc'het e Brest e miz Genver 2026. Alan a besket gant linennoù. Ezel eo eus an aozadur produerien « Les pêcheurs de Bretagne », ha droug a oa ennañ pa lavare : « *Evit*

**Skrapet ez eus
bet ul lodenn vras
eus kota brizhilli
Frañs gant un
embregerezh
liesvroadel
izelvroat.**

*ar brizhilli e ouzomp
mat piv a besket ar
muiañ anezho, ha
piv 'rankfe ober stri-
voù ma fellfe deomp
bezañ efedus da
vat* ».

Pa voe klozet an darvoud e oa ur pal gant ar re o doa kemeret perzh en-

nañ : kas ur stourm asambles, pesketaerien ha kevredigezhioù a zifenn an endro, evit ma vefe doujet ouzh mellad 17 Politikerezh boutin ar pesketaerezh (PAC ar besketaerien). Ennañ e vez diferet e rankfe ar c'hotaioù bezañ roet hervez vertuz ar bigi, ha n'eo ket hervez ar c'hementad a besked a veze paket ganto gwechall. Kotaioù brasoc'h a rankfe mont da besketaerien a werzh o fesked e Frañs, neuze.

8] « Arrêté du 26 décembre 2006 établissant les modalités de répartition et de gestion collective des possibilités de pêche (quotas de captures et quotas d'effort de pêche) des navires français immatriculés dans la Communauté européenne », *Journal officiel* n°301, 29 a viz Kerzu 2006

LAMET O GWIRIOÙ DA BESKETA DIGANT PESKETAERIEN AN AODOÙ

Penaos eo bet tennet o gwir da besketa er gêr digant ar besketaerien-aod vihan ? E fin an 20vet kantved ne oa ket gwall zedennet ar voraerien vreizhat gant ar brizhilli, pesked ordinal na vezent ket gwerzhet ker. Un armatour, er c'hontrol, en doa pariet warno ken abred hag ar bloavezhioù 1980 : Antoine Dhellemmes, krouer France Pélagique.

Un armatour kozh en deus soñj eus an istor : « *Kejet en doa ouzh tud eus an Izelvroioù a oa e penn Cornelis Vrolijk. Kinniget o deus dezhañ krouiñ France Pélagique*

evit degas kotaioù Frañs d'o embregerezh. » « *O soñj dezho a oa kaout kotaioù ar spesadoù pesked a veze laosket en dour gant ar besketaerien e Frañs.* »

E-pad bloavezhioù o doa paket kement a vrizhilli – kuzh eo ar sifr resis, hervez Bloom⁹ – ken o deus o listri gwarantizoù fetis evit gallout leuniañ o rouedoù gant pesked bihan druz evit ar bloavezhioù o tont. Antoine Dhellemmes en doa gwerzhet e lodennoù d'an Izelvroiz a-raok mont war e leve¹⁰. « *Trec'h int da vat. Pennrener eo e vab Geoffroy Dhellemmes hiziv, met o goprad eo dezho nemetken* », eme hon titourer da glozañ.

« Nebeutoc'h eo digresk ar c'hota brizhilli evit ma oa bet rakwelet da gentañ gant an UE. »

Setu penaos ez eus bet skrapet ul lodenn vras eus kota brizhilli Frañs gant un embregerezh liesvroadel izelvroat, o toujañ da reolennoù ar marc'had. War vor e vezont gant ur banniel trilliv, met o listri « *n'eus tra gall ebet enno – nemet o c'hota* » hervez kalz pesketaerien vreizhat. France Pélagique a respont e vez gopret martoloded eus Frañs ganto dreist-holl, ha kalz Bretoned en o zouez.

Tamallet e vez France Pélagique gant ar besketaerien vihan, met war-zu hanternoz Europa emañ an embregerezh o sellout. « *Mantrus eo. Ar pesketaerezh er-maez lezenn a soñjer e c'hoarvez en*

9] « Bloom attaque en justice pour obtenir la transparence sur les quotas de pêche », kemennadenn d'ar gazetennieren Bloom, 11 a viz Kerzu 2023

10] « CSR report 2024 », danevell, Cornelis Vrolijk

donvor da Berou pe da Indez, met graet e vez kenañ e-tal d'an Europ », eme Geoffroy Dhellemmes dre bellgomz e fin miz Genver. Komz a ra eus an diviz bet graet e fin ar bloavezh 2025 gant ministred ar pesketaerezh er Stadoù ezel eus Unaniezh Europa, evit digresk ar c'hotaioù dre 70 %¹¹. Mont a raent a-du gant ali ar skiantourien. Splann e oa ar gaoz ganto, hag adlavaret e veze e pep lec'h : kiriek e oa Unaniezh Europa, hag ober a rae ar pezh a oa dleet evit an endro. Ar Stadoù arvorek (Norvegia, Island, Inizi Faero, Rouantelezh-Unanet) o doa divizet digreskiñ nebeutoc'h o c'hotaioù, dre 48 %, o priziañ ar stok brizhilli uheloc'h ouzhpenn.

Geoffroy Dhellemmes lavar eo atebek ar besketaerien eus broioù maez Unvaniezh Europa evit diskar an niver a vrizhilli. Padal e adkaver anv Cornelis Vrolijk¹² (perc'henn France Pélagique), e strolladoù listri evit ar pesketa en donvor er Rouantelezh-Unanet hag en Inizi Faero... Lodennoù bras eus kotaioù ar broioù-se o deus skrapet ivez. D'an 30 a viz Meurzh, e oa bet divizet gant an UE mont en-dro a-benn ar

« Digresk ar c'hota brizhilli, nebeutoc'h evit ma oa bet rakwelet gant Unaniezh Europa da gentañ. »

fin en ur genderc'hel gant an digresk da c'hortoz eus - 48 % eus an hollad aotreet da dapout ar makrell, an hini dibabet gant ar Stadoù arvor kritiket. Anat eo n'eo ket an daou lestr-uzin gall a zo kiriek o-unan evit diskar ar pesked-donvor-se. Ne cheñchont ket kalz traoù e-barzh al lestraz industriyel a labour er morioù lec'h ma vev an taoladoù-brizhilli.

E fin ar bloaz 2021 e veze kontet 94 lestr industriyel war vor e Stadoù Unaniezh Europa ha Rouantelezh-Unanet gant Kevredigezh chaluterioù-skornerez ar pesketaerezh en donvor. 214 a oa pa veze ouzhpennet an takadoù-pesketa e Norvegia, Island hag en Inizi Faero¹³. Met o ferzh o deus, ha perc'henn int war ar gwirioù-pesketa gall evit un embregerezh liesvroadel marlonk gant ar pesked-donvor, se'zo kaoz e vez droug outo er vartoloded vreizhat.

LAKAAT UL LODENN EUS AR C'HOTA EVIT AN ARTIZANED ?

E penn-kentañ ar bloaz 2026 e voe krouet ur strollad-labour e bal klask kaout diskoulmoù diouzhtu evit ar

11] « Conseil des ministres européens sur les possibilités de pêche 2026 : la France obtient des résultats équilibrés pour protéger sa filière et préserver les ressources », kemennadenn d'ar gazetennerien, Ministrerezh an Treuzkemm ekologel, 13 a viz Kerzu 2025

12] « CSR report 2024 », danevell, Cornelis Vrolijk

13] « Une pêche industrielle dangereusement efficace : comment les multinationales néerlandaises menacent la pêche artisanale européenne », danevell, Jelto Makris, Zoe W. Brent, Thibault Josse, Transnational Institute, miz Here 2021

besketaerien brizhilli. Kaset e oa gant Mayeul de Drouâs, isrener an danvez pesketouriezh e Pennrenerezh an aferioù-mor. D'an 20 a viz Genver e voe aozet un emgav dre vizio. Tenn e voe. Delphine Roncin, kanna-dez ar From Nord, an aoza-dur produerien m'eo ezel France Pélagique anezhañ, a zifenne an embregerezh hep envel anezhañ met oc'h implij e holl arguzennoù. Sevel a rae he mouezh a-enep d'ar Stad, a soñje lakaat ul lodenn eus ar c'hota evit an artizaned, evit ur bloaz. Un nebeud sizhunvezhioù

goude, d'an 11 a viz C'hwevrer, e embannas ministrez ar pesketaerezh, Catherine Chabaud, he doa lakaet « *ur c'hota kengret* »¹⁴ a 400 tonenn dre an 2 400 er c'hota broadel « *da ingalañ etre an artizaned* », o treuzkas anezho « *diouzh ar re vras d'ar re vihan* ». Da lavaret e vefe adkaset un drederenn eus kota France Pélagique evit c'hwec'h miz kentañ ar bloaz (hervez jedadennoù an ONG Bloom).

Un trec'h bihan evit pesketaerien an aod. Ur « *striv ret* » gant ar From Nord hervez Geoffroy Dhellemmes, a bouez memes tra evit lavar ez eo « *dibar* » an diarbenn, ha « *ne vo ket ur skouer evit an amzer-da-zont ha ne grouo gwir ebet, evit jediñ an niver a besked paket*

« Puilh 'vefent, hervez ar re a besked anezho, met e pep lec'h e welomp ez a fall an traoù ganto. »

peurgetket ». N'eo ket prest an traoù da cheñch, enta.

« FREUZ A VO »

Teñval eo an oabl evit ar besketaerien-donvor e Breizh. Brizhilli n'eus ket mui anezho, pe dost. Keineged n'hellont ket pakañ kalz hag ar genou-gammed 'zo bresk, kudennoù ment ha kreskiñ ganto. Gwir int aotreet da besketa muioc'h a vraaged, met « *n'eus ket anezho* » hervez kabiten ur boliñcher eus Sant-Wennole. Sardineta emaint o vont d'ober evel e 2025, neuze, pa n'eus kota ebet war ar sardin.

« *Evit ar c'hementadoù, n'eus nemet se a chom deomp* », eme Jérémy Gourmet, kabiten ar Sardane, a labour gant ar

14] « Redistribution de 400 tonnes de maquereau : "On est juste en train de partager la misère" », Marielle Marie, *Le Marin*, 18 a viz C'hwevrer 2026

boliñch hag a bak 1.000 tonenn sardin
 bep bloaz. « Ma 'z aio an traoù a-dreuz
 gant ar sardin e vo echu ganeomp »,
 emezañ, ankeniet, pa n'int ket yac'h
 ouzhpenn, bihanoc'h-bihanañ, bres-
 koc'h-breskañ. « Evel an holl besked eus
 an donvor », eme gClaire Sergent eus
 Bloom. « Puilh 'vefent,
 hervez ar re a besked
 anezho, met e pep lec'h
 e welomp ez a fall an
 traoù ganto. Ar mer-
 lanked glas zoken, a vez
 graet surimi ha bleud
 diwar loened ganto, a
 vefe mat-tre an traoù
 ganto, sañset : digresket ar c'hota dre
 41 % ar bloaz-mañ ! »
 « N'heller ket ober hep kotaioù, d'am soñj,
 met ret e vefe soñjal anezho gwelloc'h, war
 hir amzer [ha n'eo ket a vloaz da vloaz]
 o telc'her kont eus ober ur spesad war

**« Ar sardin n'eus
 kota ebet warno,
 met magañ kalz
 pesked all a reont,
 hag ar re-se eo
 a ya da goll. »**

egile. Ar sardin, da skouer, n'eus kota ebet
 warno, met magañ kalz pesked all a reont,
 hag ar re-se eo a ya da goll », eme zDidier
 Gascuel, kelenner war ekologiezh ar
 mor en Agrocampus Ouest e Roazhon.
 Daoust ha diwallet e vo d'ar sardin ?
 « Tout an dud 'zo 'vont da skeiñ e-barzh,
 d'ober vol, ha goude-se
 'vo ret lakaat ur c'hota
 ha serriñ war-lerc'h »,
 a gav d'ar pesketaer
 eus Sant-Wennole.
 « Memes mod e c'hoar-
 vez an traoù ha gant ar
 brizhilli, met ar wech-
 mañ n'eus nemet se
 ken. Amañ e Sant-Wennole, ne vo ket ken
 nemet ober ur steuñv da derriñ bigi. » Da
 lavaret eo distruj al listri ha digollañ ar
 besketaerien.

Robin Bouctot

DAOUST HA PAQUEZET E VO DA CHALUIÑ

Kresket eo priz ar gazeoul buan, ha setu un enkadenn nevez evit ar chaluterien. Burutellet eo bet ar pesketa gant rouedoù-stlej abalamour d'e efedoù war an endro. Ha bremañ e vez lakaet en arvar peogwir n'eo ket ampletus a-walc'h. Daoust ha mont a ray da get ? Deomp da borzh marilh ar Gelveneg, lec'h m'eo kozh istor ar chaluterien.



Damien Roudeau

- » Emañ ar besketaerezh e kreiz buhez Gelveneg met eo bet distrijuet ur c'hard eus e chaluter ha kouezhet eo fard koc'hu-pesked dre 20 % e 2023.
- » Ar chaluterien a gemer perzh e skuizhidigezh ar pesked a gaoz da pesketa a re.
- » Ur chaluter etre 20 ha 24 metr a implij 4 gwech muioc'h a gazeoul evit ur vag-rouedañ, ha 10 gwec'h muioc'h evit ur vag-kevella dindan 16 metr.

Ur barrad-amzer a c’hwezhe war aod ar Gelveneg, en deiz-se eus miz Genver 2026, ha chomet e oa ar bigi er porzh. Gwintañ a rae o c’houc’h gant ar fourradoù avel, goull o c’hambrigoù ha punet o rouedoù en a-dreñv. Nebeutoc’h anezho a zo hiziv, met ur gwir ziduañs eo ar chaluterioù c’hoazh. E-pad an hañv e teu touristed kement ha tud eus ar vro war ar c’hae da sellet outo pa zeuont en-dro d’ar porzh d’abardaez. Pep hini d’e dro ez en em gavont, evel en un dibunadeg, gouelaned e-leizh o nijal war o lerc’h. En istor ar Vro Vigoudenn emañ ar pesketaerezh dre vras, ha gant ar chalu dreist-holl : e meur a familh e kaver martoloded, micherourien a labour evit marc’hadourien-pesked pe e chanterioù-bagoù. E porzh marilh ar Gelveneg e vez graet 17,5 % eus produiñ Frañs¹. An trede porzh-pesketa² eo er stad a-bezh. 89 chaluter³ a oa ennañ e 2024, pa oa 12 anezho e Konk-Kerne, 7 e Montroulez ha 3 e Brest nemetken. Gant ar pesketaerezh-se e tegaser merluzed, grilhed-traezh ha boultouzed. E-kreiz ekonomiezh ar vro emañ. 60 % eus ar pesked diskarget e koc’hu-pesked ar Gelveneg, ha betek 80 % eus an dalvoudegezh a zo

bet pesketaet gant chaluterien, hervez Poellgor-rannvro ar pesketaerezh⁴ hag ar sevel loened-mor.

Abegiñ war an ostilh-se a vez graet kalz bremañ : abaoe pell e vez meneget e efedoù ouzh an endro, met nevez ‘zo ez eus anv eus an arc’hant ivez. Enkadenn ar pesketaerezh a c’hellfe bezañ pell pa n’ouzer ket petra eo hec’h efedoù er vro. Anat eo amañ : ur gennad ekonomikel ret-holl eo ar pesketaerezh. Ur sevenadur, ur glad hag ene ar vro eo ivez. Emañ ar glav oc’h ober war ar c’hae : ha ma ‘z afe pep tra da get ?

Anat eo ar sifroù. 10 % eus he fostoù-labour he deus kollet ar filierenn « produioù-mor da zebriñ » (a endalc’h ar pesketaerezh, ar merdeñ hag ar c’henwerzhañ) etre 2019 ha 2024⁵, da lavaret eo 1.828 post-labour, hervez Arsella an ekonomiezh-mor e Breizh. 1.394 he deus kollet Bro-Gerne (enni porzhioù-mor ar Vro Vigoudenn evel ar Gelveneg, Sant-Wennole ha Leskonil). Ar vro-se an hini he deus gouzañvet ar muiañ. Diaes e oa bet ar bloaz 2023 : ur steuñv tennañ diwar al lestraz a oa bet goude ar Brexit evit ma vefe pesketaet nebeutoc’h gant lestraz Frañs pa oa bet serret takaoù mor saoz. Distrujet e oa bet 45

1] « Le Guilvinec », pajenn internet Pavillon France, bet gwelet e miz Even 2026

2] « Son port de pêche et de plaisance », pennad el lec’hienn internet ar Geleveneg, bet gwelet e miz Even 2026

3] « La pêche en Finistère Chiffres 2024 », Renerezh-departamant an tiriadoù hag ar mor, dileurierezh evit ar mor hag an arvor

4] « L’avenir de la pêche bretonne passe par le chalutage », kemennadenn d’ar gazetennerien, poellgor-rannvro ar pesketaerezh mor hag ar sevel-loened mor e Breizh, miz Meurzh 2025

5] Observatoire de l’économie maritime en Bretagne n°3, danevell, miz Kerzu 2025

bag⁶ e Breizh, 26 chaluter eus porzh ar Gelveneg en o zouez. Kouezhet eo fard koc'hu-pesked ar Gelveneg dre 20 % etre 2022 ha 2023. Anat eo ne bado ket pell e mod-se ken.

PESKETA A RE HAG A BEP SEURT... KAOZ A ZO EUS AR CHALU

Ur c'hantved 'zo e vez implijet rouedoù-stlej don er Vro Vigoudenn : « *E fin an 19vet kantved e voe diorroet ar rouedoù-stlej gant panelloù e Breizh-Veur, ha ken abred ha 1934 e veze graet ganto amañ evit mont da ravel-
liñ war «al lec'hideg vras», ur bladenn vras a lec'hid, a draezh hag a vein. [Mont a ra eus Su ar Gelveneg betek Enez Oleron, lec'h ma vez graet ar grilheta⁷, NGAS] 8 martolod a oa ret kaout evit punañ ar roued-stlej gant an dorn. Goude-se e oa deuet ar mekanikaat, bigi galloudusoc'h, hiroc'h, ha punerioù mekanikel », a gont Joseph Coïc, istorour ar pesketaerezh er Vro Vigoudenn. Er bloavezhioù 1960 e voe savet koc'hu-pesked ar Gelveneg pa oa muioc'h a bakadurioù, ha deuet e oa an niver a chaluturioù-donvor da dri-ugent kazimant⁸.*

Krouet e oa bet ar c'houtoù er bloavezhioù 1980 evit mirout ouzh ar pesketa a re.

Fall-tre eo sell ar gevredigezh ouzh ar chalu abaoe bloavezhioù. Buan e voe pesketaet a re abalamour dezhañ. Gant ar c'hefluskerioù e oa gouest listri Europa da bakañ muioc'h-muiañ a besked, ha dont a raes diaes dezho gouennañ. Diarbennoù a voe kemeret en Europa, hag e Frañs goude, ken abred hag ar bloavezhioù 1980, an dibab kotoioù evit gwareziñ ar stokoù en o zouez⁹. Met n'eo ket bet a-walc'h. Drastus eo ar chaluoù evit strad ar mor c'hoazh, ha paket e vez n'eus forzh pesurt pesked ne glas-ker ket pakañ ganto. En ur studiadenn embannet gant an Ifremer¹⁰ e 2023 e lenner : « *Efedoù eeun en deus ar pesketa gant rouedoù don war ar spesadoù bentek hag o annezioù. Un ostilh o tremen a c'hell tennañ anezho — evit ar re a zo staget ouzh ar strad —, bre-
viñ, flastrañ pe endonañ anezho, pe kas anezho da c'horre an dour er rouedoù. Fiñvet e vez ar gouelezennoù, ar pezh a cheñch o annez ha morfologiezh ar strad, zoken .../... An tammoù gouelezenn a vez strewet en-dro. Gallout a reont lakaat diaes analañ ha debriñ da spesadoù 'zo.* »

6] « La crise de la pêche plombe les criées bretonnes », Olivier Mélenec, *Ouest-France*, 19 a viz C'hwevrer 2024

7] « La langoustine, une vraie star de l'été à déguster au Croisic », *Ouest-France*, 17 a viz Eost 2025

8] « Le Guilvinec, premier port de pêche fraîche de France », Jean-Marie Couderc, Bulletin de l'Association de Géographes Français, 1968, pajenn internet Persée, bet gwelet e miz Even 2026

9] « Les actions menées en faveur de la politique maritime et littorale de la France », Danevell Ofis ar Parlamant niv. 345, levrenn V, 6 a viz Meurzh 1998

10] « Comment la science évalue-t-elle les impacts de la pêche sur les fonds marins », Ifremer, 9 a viz C'hwevrer 2023

« Efedoù eeun en deus ar pesketa gant roue- doù don war ar spesadoù bentek hag o annezioù. »




Kalz pesked na oant ket klasket a vez paket gant ar rouedoù-stlej ivez. Aet eo an traoù war wellaat, eme ar besketaerien : brasaet eo ment al lagadoù evit leuskel ar re yaouank da baseal, da skouer. Met n'eo ket a-walc'h. Hen anzav a ra ur pesketaer kozh gant ar roued-stlej don : « *paket e vez pep tra gant ar mekanik-se, se 'zo kaoz e vez pesketaet re a besked ivez. Pakañ spesadoù na vezont ket klasket en deus un efed war an endro hag an ekosistemoù,*

sur-mat eo ». Abegoù o deus lakaet Unaniezh Europa da verzañ ober gant rouedoù-stlej don, dindan 800 metr, da heul ur c'houlzad kelaouiñ gant an ONG Bloom e 2016¹¹.

LONKERIEN GAZ-EOUL, N'EO KET AMPLETUS AR CHALUTERIOÙ KEN

Daoust d'e efedoù war an endro e veze implijet ar chalu kalz peogwir e oa ampletus. Met ampletus e oa, hervez

11] « L'Europe interdit enfin le chalutage profond ! », kemennadenn d'ar gazetennerien, lec'hienn Bloom, 30 a viz Even 2016, pajenn bet gwelet e miz Even 2026



Damien Roudeau

an ONG Bloom¹², peogwir e veze si-kouret gant ar skoaziadennoù publik a vez roet d'ar gennad dre ar gazeoul didailh. Cheñchet pep tra e 2022 : deuet e oa goulennoù war e batrom ekonomikel ivez. Kalz energiezh a vez lonket gant ar chaluterieoù : 413.946 litrad gazeoul a vez implijet bep bloaz gant ur chaluter etre 20 ha 24 metr, hervez sifroù ar programm europat Amarrée¹³. Ur vag-rouedañ ken bras ne implij nemet 101.751 litrad bep

bloaz, da lavaret eo 4 gwech nebeutoc'h, hag ur vag-kevella dindan 16 metr 38.603 litrad bep bloaz, da lavaret eo 10 gwech nebeutoc'h. Kresket eo priz an danvezioù krai gant ar brezel en Ukraina ha daoust d'an didailhoù publik : 0,35 sañtim e kouste ul litrad ar gazeoul e 2020. 0,84 sañtim e kouste e 2022. Priz an danvezioù dresañ ha sevel bigi a zo kresket dre 30 % ouzhpenn, ar pezh a lak ar c'hempenn anezho da vezañ koustus-tre. Ur

12] Campagne « Quelles sont les solutions ? », lec'hienn Bloom, pajenn bet gwelet e miz Even 2026

13] « Prix du Gasoil Pêche et du Brent : suivi tendanciel », arsellva an trelosk, programm Amarrée, pajenn bet gwelet e miz Even 2026

« Ne c'hellomp ket lakaat priz ar pesked da greskiñ pa gresk ar prizioù. »

chaluter nevez, evel ar Marie Lou¹⁴, a zo brasoc'h eget 20 metr en Oriant, a goust ouzhpenn tri milion a euroioù.

Undeizgoañvarneveke oa. Christophe Collin, rener an Armement Bigouden, a oa en e vurev e porzh ar Gelveneg. Sellet a rae ouzh stad e listri ouzh un tele bras peget ouzh ar voger : lod eus e nav chaluter-donvor a oa er Mor Keltiek hag en hanternoz Pleg-mor Gwaskogn, hag o hent a veze gwelet ouzh ur gartenn. Gant ar bigi-se etre 23 ha 25 metr e vez pesketaet bouldouzed, raeed ha maraved, spesadoù bentek a vev e strad ar mor¹⁵.

Liv gris evel an tourmant o tont en doa e spered. An hanter eus e lestraz en deus kollet porzh ar Gelveneg : « *Ispisial eo hor micher. Kontrol d'ar*

micherioù all, nemet al labour-douar, ne c'hellomp ket lakaat priz ar pesked da greskiñ pa gresk ar prizioù. Ne werzhomp ket pesked, prenet e vez diganeomp. » Setu an dra ispisial gant priz ar pesked : cheñch a ra bemdez, rak gwerzhet e vez ar pesked diouzh ar c'hresk hag an digresk, hervez ar c'hementadoù bet diskarget er vro, hag e Frañs a-bezh. Neuze ne oar ket an dud a-vicher pegement e vo gwerzhet

o fesked pa ziskargont anezho, ha ne c'hellont ket azasaat o marz d'ar priz ma vo gwerzhet. N'ouzont ket ha kollet e vo arc'hant ganto.

« UN TABOU EO ECHUIÑ GANT AR CHALU »

Edo al luc'hed o strinkañ en aer a-us d'ar c'hae, hag anat e oa : skoet e vo ar Vro Vigoudenn gant enkadenn ar chalu da vat. Ret e vefe soñjal enni, kavout disoc'hoù pe ur mod all d'ober evit mirout ekonomiezh ar vro ha lakaat anezhi da vevañ a-hed ar bloaz. Pe, da nebeutañ, diwall na vefe harpet war an douristelezh nemetken, pa n'eus anezhi nemet en hañv. An enkadenn-mañ a c'hellfe bezañ gwelet evel un digarez da adsoñjal ar pesketaerezh

14] « Lorient. Un chalutier neuf pour le port de pêche », Charles Josse, *Ouest-France*, 4 a viz C'hwevrer 2019

15] « L'Armement bigouden a connu une année «correcte» malgré l'inflation », Franck Jourdain, *Le Marin*, 31 a viz Here 2024

en e bezh, eus tu an ekologiezh, an ekonomiezh hag ar gevredigezh.

An dud a-vicher n'o deus ket labourer war an dachenn-se, eme un den a anavez mat ar pesketa : « *Un tabou eo echuiñ gant ar chalu. Gouzañv an enkadenn a vez graet, n'eo ket soñjal anezhi.* » Eus tu Poellgor broadel ar pesketaerezh e responder trumm : « *N'eus forzh petra 'vefe paouez gant ar rouedoù-stlej. Bihanaet eo bet o efedoù war an endro hag un ostilh produiñ eo a warant pesked evit an holl dud d'ur priz dereat, dreist-holl.* »

Er porzhioù-mor, pell diouzh an ensavadurioù ofisiel, e klasker adkavout ur patrom ekonomikel. Gant ur pal : implijout nebeutoc'h a c'hazeoul oc'h ober gant teknikoù nevez-grouet. Jean-Baptiste Goulard, er Gelveneg, en deus savet ar chaluter kentañ a vez kaset war-raok

gant ur c'heflusker diesel-tredan, ar « Blue wave », e 2022 : « *Pemp bloaz a zo bet etre ar meizañ hag ar sevel. Ret eo bet kavout un hent etre ment al lestr, digreskiñ ar roued hag ar fardaj ha ment ar chalu evit espern 20 % a energiezh. E penn-kentañ e lavare ar galloudoù publik e oant o vont d'am skoazellañ, met e fin ar gont on bet ma-unan evit ar riskloù arc'hant. N'em eus ket keuz bremañ, met ne rafen ket ar memes tra en-dro, re arvarus eo ar blegenn ekonomikel.* »

Julien Lebrun, armatour gant dek

chaluter¹⁶ etre 14,5 ha 16 metr e porzh marilh ar Gelveneg, en deus studiet mennozh an hidrogen eus e du. Paouezet en deus buan : « *Bras-divent eo ar c'hementad hidrogen a ranker kaout evit produiñ kement a energiezh hag a reer gant gazeoul, n'eus bag ebet akipet evit se e Breizh. Ha ne vefe ket ampletus kemm ur vag evit ma 'z afe en-dro gant tredan.* »


Eus tu an enklask, emañ an Ifremer o klask nevesaat an ostilh e-unan gant daou raktres. Pal an hini kentañ a zo lakaat ar roued da zibab gwelloc'h ar pesked : « *emaomp en soñj staliañ un IA e toull ar roued-stlej evit anavezout ar spesadoù. Tretet e vez an titouroù diouzhtu, ha hep gortoz e c'hell ar*

pesked bezañ laosket da vont. E-barzh ur c'hoñsorsiom europat e labouromp evit an ostilh-mañ, hag asambles gant un embregerezh

breizhat - Marport - a-benn industrielaat anezhañ evit ma vefe implijet gant ar besketaerien », eme bPierre Le Bourdonnec, teknikour war an deknologiezh evit ur pesketaerezh padus. « Pas Cap » eo anv an eil : « *Azasaet hon eus ur sistem a zistok ar panelloù evit bihanaat o efed war ar strad hag arboellañ trelosk. Mont a ra en-dro an doare-se met n'eus framm lezennel ebet evit broudañ ar besketaerien d'ober gantañ, evel ma zo e Spagn* », eme vBenoît Vincent, arbennigour war nerzh an

Skoet e vo ar Vro Vigoudenn gant enkadenn ar chalu da vat.

16] « En raison d'une trésorerie serrée et malgré de bons résultats, l'armement Le Brun réorganise sa flotte de pêche », Franck Jourdain, *Le Marin*, 27 a viz Genver 2026



Damien Roudeau

dour ha mekanik an ostilhoù pesketa, keuz ennañ.

EVIT « DICHALUAAT »

Daoust ha padus e c'hell bezañ an dis-koulmoù-se ? N'eo ket gwall entanet ar re a-du gant an "dichaluaat" gant an tao-lioù-arnod-se. Evit an ONG Bloom, a brezeg fin ar chalu tamm-ha-tamm, n'eus nemet un doare d'ober : diorren ar pesketaerezh artizanel¹⁷. « Ar pesketaerezh bihan artizanel a zeu postoù-labour gantañ evit kementadoù bihan a besked paket hag

un talvoudekaat mat. Gantañ omp sur da vont war-zu ur pesketaerezh padus, a-enep d'ar pesketaerezh industriel a vez distrujet pep tra gantañ. »

Gant ar sav-poent-se emañ a-du Didier Gascuel, kelenner war ekologiezh ar mor, rener ar Pol pesketouriezh, mor hag arvor en Ensavadur Agro, hag en deus skrivet al levr *La pêchécologie*¹⁸, bet embannet e 2023. « Ar ger "dichaluaat" 'oan bet e-touez ar re gentañ oc'h ober gantañ. D'ar mare-se e seblante bezañ diaes, met bremañ eo anat : mare ar rouedoù-stlej a zo o tostaat d'e zibenn.

« Kondaonet eo ar chalu. Poent eo echuiñ an abadenn. »

17] « La pêche artisanale », pajenn internet Bloom, bet gwelet e miz Even 2026

18] *La pêchécologie, manifeste pour une pêche vraiment durable*, Didier Gascuel, embann Quaes, miz Genver 2023

Troet eo ar bed : n'eus ket kalz pesked ken ha ne vo ket mui posupl pesketa en ur feson a zistruj kement ; ouzhpenn da se ez a priz an eoulmaen war-gresk hag ar chaluterioù ne c'hellint ket derc'hel. Soñjomp ivez e ranker dispign ul litrad gazeoul evit pesketa ur c'hilo pesked. Bezomp soñj e vez paket 40 % a re yaouank ganto ha ne chom bev ar gennad a-bezh nemet gant ar skoa-ziadennoù publik. Poent eo echuiñ an abadenn. »

Un doare all a vez kinniget gant an enklasker : « pell 'zo e vez pesketaet al lodenn vrasañ eus ar spesadoù gant ostilhoù chag. Grilhedtraezh real a c'heller pakañ gant kevell, da skouer. An doare-se 'm eus kinniget da veur a vinistr : dav e vefe leuskel un takad hep pesketaerezh e-pad daou vloaz, ha lakaat kevell

goude, evel ma vez graet en Iwerzhon. Ar mordreseged pe ar boultouzed c'heller pesketa anezho gant linennoù pe rouedoù. N'eus ket anv da besketa en takad aod nemetken evel-just, gallout a ra ar bigi brasoc'h mont d'an donvor ». Posupl e vo ober ar cheñchamant bras-se war grenn dermen, hervezañ, ma vo adingalet ar c'hotaioù evit ar pesketaerezh artizanel [lennit lodenn 2 an enklask] : « 32 vloaz eo oad krenn ar bigi-pesketa, ret e vo cheñch anezho forzh penaos. Profitomp evit sevel bigi-rouedañ pe bigi-linennañ e-lec'h chaluterioù er 15 vloaz o tont » emezañ c'hoazh.

**« Sevel
bigi-rouedañ
pe bigi-
linennañ
e-lec'h
chaluterioù
er 15 vloaz
o tont. »**

Charles Braine en deus krouet Pleine Mer¹⁹, a bled patrom ar pesketaerezh artizanel. Stourm a ra ivez evit ma vefe kemmet ar gennad : « Ret eo deomp cheñch hor feson d'ober evit pakañ ar pesked, met evit gwerzhañ anezho ivez. Dav e vefe adperc'hennañ ar c'hoc'hu-pesked evit kaout ul lec'h gwerzhañ meret gant an dud a-vicher asambles a-benn talvoudekaat priz ar pesked, met evit stokañ skorn ivez da skouer. Erfin, gallout a reer mont dre lec'hiennoù evel Poiscaille, a ginnig produioù a-galite d'ar brenerien, ha moneiz a-walc'h d'ar besketaerien da vevañ. »

19] « "Au cul du bateau" : une BD qui raconte la vente directe », kemennadenn d'ar gazetennerien, Plein-mer, 10 a viz Meurzh 2026, pajenn web bet gwelet e miz Even 2026

DIBAB UR PATROM SOKIO- EKONOMIKEL

Hag evit ar postoù-labour, peseurt efed a vefe hini ar cheñchamant-se ? Diaes eo gouzout resis. Ar re a sav a-du gant digresk implij ar chalu a gav dezho eo kalz gwelloc'h ar pesketaerezh artizanel (graet gant listri bihanoc'h eget 12 metr ha gant ostilhoù chag) evit an implijoù eeun. Deskrivet eo er studiadenenn Transipêche²⁰ bet embannet e 2025 : « *En tu all d'ur post-labour dre zaou a zo er pesketa gant ostilhoù chag. Kontañ a reer ouzhpenn da 3.200 post-labour evit ar pesketaerezh-aod, (35 % eus hollad an implijoù) 1.700 en o zouez e pennvro Frañs. War an aod Atlantel ez eus bigi-rouedañ ha kevella dreist-holl, ha bigi-linennañ tramor.* » Ar re a zifenn ar pesketa gant rouedoù-stlej a bouez war ar filieren en he fezh hag ar vro a vev gant an implijoù ameeun. Anv a reont eus ar chanterioù-bagoù, an teuzerezhioù hag ar varc'hadourien-pesked, met ivez eus implijidi ar gourmarc'hadoù, an apotikerien pe c'hoazh ar gelennerien. Souezhus-tre e c'hell bezañ : n'eus ket a sifroù resis evit gouzout ped post-labour eeun pe ameeun a vez krouet er

**Ne vev ar gennad
a-bezh nemet
a-drugarez d'ar
skoazelloù foran.**

vro a-drugarez da bep mod da besketa. Evit ul live hollek ez eus bet embannet ur studiadenenn gant skol-veur Naoned²¹. Hervezi, war ar fasadenn « *Akitania, Poatev Charentez, Broioù al Liger* », e teu tro-dro da zaou bost-labour en aod evit ur post-labour war vor, etre hollad ar postoù-labour leun-amzer war vor hag ar postoù-labour krouet en holl c'hennadoù en aod. Pouez gennad ar pesketaerezh evit kaout labour en arvor a-hed ar bloaz a vez diskouezet gant an disoc'hoù-se. Met n'eo ket a-walc'h evit sikour d'ober divizoù politikel hervez efedoù pep doare pesketa.

Peseurt diviz politikel ober evit an ti-riad, neuze ? Dilennidi ar vro a sav a-du evit kenderc'hel gant ur patrom ma vez mistri ar chaluterioù ennañ, en ur bro-metiñ memes koulz e vo digarbonet ar pesketaerezh : « *Dav e vefe sevel bigi a ya en-dro gant energiezhioù digarbon. Met berzet eo gant Politikerezh boutin ar pesketaerezh arc'hantaouiñ bigi nevez gant skoaziadennoù publik, setu an dalc'h. Emaomp o varc'hata e Brusel evit adwelet Politikerezh boutin ar pesketaerezh ha harp ar vinistrez hon eus. Sevel bigi ledanoc'h evit ma vefent aes d'an akipajoù ha gant ur c'hefluskañ nevez eo hor pal.* »

20] « Évaluation des performances environnementales, économiques et sociales des flottilles de pêche : Bilan France », Danevell ar programm Transipêche, Florian Quemper, Harold Levrel, Romain Mouillard, Didier, Gascuel, embannadurioù rann ar pesketaerezh, ar mor hag an arvor eus an Institut Agro n°56, miz Even 2025

21] « Une mesure par pêcherie de l'emploi direct (en mer et à terre) et de l'emploi induit : le cas des principales espèces de l'Agia dans le Golfe de Gascogne », L. Baranger, JF Bigot, Y. Perraudau, Len Corrail, Skol-veur Noaned

Heñvel e vefe ar c'hementad pesked paket », eme zDaniel Cueff, besprezidant Rannvro Breizh, e karg eus ar mor hag an arvor. Menegomp n'o deus respontet d'hor goulennoù evit an enklask-mañ na ministrez an Treuzkemm ekologel, ar Vevliesseurtesed, ar C'hoadoù, ar Mor hag ar Pesketaerezh, na Pennrenerezh an aferioù-mor (DGAMPA).

Kalz goulennoù a chom e penn hon enklask. Dibab ur patrom evit ar pesketaerezh a dalvez dibab patrom ar gevredigezh dre vras. Dibab un doare da broduiñ protein o tont eus ar mor en do efedoù war gwareziñ ar meurvorioù, terkañ an tiriad, war vuhez ar vro, war an darempredoù sokial hag an implij. An diskoulmoù teknologel a c'hell sikour war verr dermen, met ker int da broduiñ ha da brenañ evit ar besketaerien. Ur skoilh int ouzhpenn evit ma vefe goulennataet ar patrom da vat. Brav eo an diskoulmoù all, evel ar pesketaerezh gant kerdin-higennoù en donvor. Met hir e vo lakaat anezho e plas ha n'ouzer ket hag e vint a-walc'h evit magañ al lodenn vrasañ eus an dud gant prizioù dereat. Da echuiñ, kenderc'hel gant ar patrom a zo anezhañ dija o kaout spi e vo digarbonet gant

Dilennidi ar vro a sav a-du evit kenderc'hel gant ur patrom ma vez mistri ar chaluterioù ennañ.

teknologiezhioù a zo nevez-tout hag o tont a-benn, moarvat, da lakaat al lezennoù da cheñch, a c'hell leuskel ac'hanomp hep diskoulm ebet.


Dre vras, ne c'hell hini ebet eus an tresoù-se diluziañ ur gudenn vras : gant annezidi Frañs e vez enbroet an div drederenn eus ar pesked a zebront²². Ha n'eo ket pesket paket er vro a vez debret ganto, met kolined Alaska pe chifretez eus Greunland.

Catherine Le Gall

22] « En 2022, l'excédent agroalimentaire atteint son plus haut niveau depuis 2013, bénéficiant de la forte hausse des prix des céréales », synthèses conjoncturelles n°402, Agreste, miz Ebrel 2023

PESKETAERIEN ARTIZANED A VEZ LAKAET MAEZ EUS AN DIVIZOÙ

Unan eus ar chaluterioù donvor brasañ er bed eo an Annelies Ilena. Abaoe m'eo bet prenet gant Compagnie des Pêches Sant-Maloù ez eo deuet an dizemglevioù etre ar besketaerien da greskiñ. Arc'hant, gwiraourien ha pouez politikel o deus an embregerezhioù liesvroadel. Ar besketaerien artizaned, eus o zu, a sav o mouezh hep bezañ klevet.



Damien Roudeau

- » Ma vez tapet ar pep brasañ eus ar c'hotoù gant un dornad embregerezhioù eo peogwir e vez tolpet ar galloud ganto ivez, dre ma vez gwelet e pep lec'h en ensavioù dileuriañ.
- » N'eus nemet ar re n'ez eont ket war vor hag o deus arc'hant a-walc'h ganto a c'hall kemer perzh en emvodoù ar filierenn, rak a-youl-vat eo ar gefridi-se.
- » Ne vez ket gwarantet e vefe dalc'het kont eus liesseurted an embregerezhioù pesketaerezh en ensavioù gouarn, hervez an danevell parlamantel.

Divent e seblant bezañ ke-
ment tra a weler ouzh ar
skeudennoù – rouez – bet
graet war vord chaluter
donvor brasañ ar bed. Er bloavezhioù
2000 e oant bet tennet, pa veze an-
vet Atlantic Dawn (« Gouloù-deiz an
Atlantel ») c’hoazh. Pesketa sardinig a
rae er-maez da aodoù Afrika. Ken uhel
eo flojennoù ar roued-stlej hag ar bes-
ketaerien a labour ganto. Neuñviñ a
ra ar chalu a-dreñv d'al lestr, hirañ ma
weler. Savet e vez. Mont a ra an tonen-
noù a besked a vez paket bemdez da
dremen difin dre vrec'hioù mekani-
kel, betek un uzin war vourzh. Bernet
e vezont neuze war tapisoù-ruilh ha
dornataet. E-barzh kartoñsoù klozet
ha peget e teuont
maez. Adanvet eo bet
ar ramz a 145 metrad
hirder : an Annelies
Ilena eo deuet da ve-
zañ, hag e roued-stlej
a 600 metrad hir-
der¹ (div wech uhelder an Tour Eiffel)
a c'hell pakañ 400 tonenn a besked
bemdez. Korvoet eo gant Compagnie
des Pêches Sant-Maloù (CDP).
An embregerezh familh a oa bet krouet
e porzh Sant-Maloù e penn-kentañ ar

Ar Joseph Roty, al lestr-uzin kentañ bet savet er bloavezhioù 1970.

c’hantved paseet. Deuet eo da vezañ
un embregerezh liesvroadel, meur a
benn dezhañ, hag estren e gaptal. Istor
ar bedelaat eo e istor dezhañ. Gantañ
e komprenimp penaos eo deuet ken
divent ul lestr e pesketaerezh Frañs.

PESKETAERIEN SANT-MALOÙ E BED AR FINAÑS

Er bloavezhioù 1930 e oa Victor
Pleven ur pesketaer yaouank eus
Sant-Maloù. Fellout a rae dezhañ
mont d’an Douar-Nevez da vorueta ha
krouiñ a reas neuze an embregerezh
a zeuio da vezañ CDP². Goude ar bre-
zel e oa kresk en ekonomiezh : meur a
chaluter-uzin a lakaas sevel e Polonia.
En o zouez e oa ul lestr mil-vrudet,
ar Joseph Roty, bet
savet er bloavezhioù
1970. Ar chaluter
ramzel a 90 metr a
zeuas da vezañ al
lestr-uzin kentañ³
ma veze fardet war
e vourzh toaz pesked d’ober surimi.
E 2011 e voe digresket ar c’hotaioù
merlanked⁴ glas da vat, ha ganto e
voe diskaret embregerezh ha palioù
Victor Pleven⁵. Ha setu m’en em ga-
vas un embregerezh nevez e porzh

1] « " La plus grande machine à tuer " : en Bretagne, ils manifestent contre un chalutier géant », Hortense Chauvin et Guy Pichard, *Reporterre*, 16 a viz C’hwevrer 2024

2] Fiche « L’armement Pleven », pajenn internet Bateaux de Saint-Malo, bet gwelet e miz Even 2026

3] « Saint-Malo : le départ du Joseph Roty II ne fait pas que des malheureux », Thomas Savalle, *Actu*, 26 a viz Meurzh 2026

4] « Le Joseph-Roty retrouvera ses quotas de pêche en 2012 », Stéphanie Bazylak, *Ouest-France*, 23 a viz Kerzu 2011

5] « Repos hivernal pour les navires hauturiers », Stéphanie Bazylak, *Ouest-France*, 2 a viz Kerzu 2014

Sant-Maloù, desachet gant an aferioù mat d'ober, sur a-walc'h : « UK Fisheries »⁶ a oa e anv. E berc'henned a oa an Izelvroiz Parleviet & Van der Plas (P&P) hag an Islandiz Shamherji⁷. Ha ganto ez afe Compagnie des Pêches e-barzh bed ar finañs.

Dre UK Fisheries e oa deuet an Annelies Ilena e-barzh porzh Sant-Maloù, evit gwir. Goude hanter-kant vloaz war vor e oa echu mare-labour ar Joseph Roty. Soñjet o doa tud Compagnie des Pêches lakaat sevel ul lestr all en e blas, met a-benn ar fin ne voe ket graet. Divizet o doa kentoc'h postañ arc'hant en Atlantic Dawn, ul lestr a oa e berc'henn P&P⁸ (unan eus kevranneien UK Fisheries) abaoe 2007. 15 milion a euroioù a voe lakaet gant Compagnie des Pêches evit sevel un uzin surimi⁹ war unan eus pontoù al lestr, ha cheñchet e voe e anv da Annelies Ilena. Daou bont a vefe ennañ, hervez hon titourerien. War egile e kendalc'hfe ar c'hevranneg P&P gant e labour : pesketa merlanked glas evit o gwerzhañ, en Afrika peurgetket.

« A-benn ar fin, er porzh breton emañ ar c'hapital, sez an embregerezh hag an uzin ma vez fardet ar surimi. »

P&P, UR C'HEVREDAD IZELVROAT OC'H OBER E DOULL E BREIZH


Ur meskaj diaes da grediñ, evel pep tra a denn d'al lestr-se. Re vras eo evit mont e-barzh porzh Sant-Maloù. E porzh Ijmuiden¹⁰, en Izelvroioù, e vez

6] « UK Fisheries limited and subsidiaries, consolidated financial statements », 31 a viz Kerzu 2011
7] « SH08, notice of name or other designation of class of shares ; UK Fisheries », Companies House, 18 a viz Kerzu 2023

8] « Supertrawler 'Atlantic Dawn' sold to Dutch fishing firm! », The Irish Times, 24 a viz C'hwevrer 2007

9] « Big 5, l'emprise de cinq géants néerlandais sur l'océan mondial », Bram Logger & Parcival Weijnen, danevell Bloom et Coöperatie Spit U.A., miz Mae 2025

10] « "La plus grande machine à tuer" : en Bretagne, ils manifestent contre un chalutier géant », Hortense Chauvin et Guy Pichard, *Reporterre*, 16 a viz C'hwevrer 2024



Damien Roudeau

diskarget ar pesked paket gantañ, neuze. 800 kilometr a reont e kamio-noù goude da vezañ adkaset da Vreizh. A-enep da vellad 17 Politikerezh boutin ar pesketaerezh¹¹ ez a an doare-se d'ober : diferañ a ra ar mellad e ranker dalc'hen kont eus efedoù ekonomikel ha sokial ar pesketaerezh pa roer ar c'hotaioù. A-benn ar fin, er porzh breton emañ ar c'hapital, sez an embregerezh hag an uzin ma vez fardet ar surimi, enni 150 den o labourat. Met

al lestr ne vez ket gwelet james. N'eus post-labour ameeun ebet eno, neuze, evit dresañ pe kempenn anezhañ da skouer.

Ur ment etrebroadel en deus P&P da vat bremañ, ha kavet e vez e pep lec'h er pesketaerezh e Frañs. Perc'hennañ a ra an hanter eus UK Fisheries¹². Ar familh islandat Shamherji a zo perc'henn¹³ diouzh an hanterenn all. Ha perc'henn eo UK Fisheries war 50 % eus Compagnie des Pêches,

11] Goulenn gant goulenn respont dre skrid E-008239-16 digant an eurodepute Alain Cadec (PPE) d'ar C'homisiom europat diwar-benn mellad 17 reolennoù diazez ar politikerezh boutin war ar pesketaerezh, 31 a viz Here 2016

12] « UK Fisheries limited and subsidiaries, consolidated financial statements », 31 a viz Kerzu 2011

13] « UK Fisheries limited and subsidiaries, consolidated financial statements », 31 a viz Kerzu 2022

100 % eus Euronor ha 75 % eus ar chaluter-uzin l'Emeraude, a zo e berc'henned Euronor ha Compagnie des Pêches asambles. E 2016 e oa deuet da ren ar gCompagnie Française du Thon Océanique (CFTO) e Konk-Kerne, gant e gevredad « PP Thon »¹⁴. E mod-se en doa prenet 14 lestr-touneta¹⁵.

Perc'henn eo P&P war 53 lestr etre tout, 17 anezho gant ur banniel gall, hervez an danevell *Big 5*¹⁶ bet embannet gant an ONG Bloom e 2025. 30 % eus e lestraz a zo marilhet e Frañs, enta, pa vez listri all gant bannieloù lituaniat, jorjian pe spagnol. En tu all da 10.000 den¹⁷ a vez gopret gant an embregerezh er bed, e Portugal, e Spagn pe e Lituania. Ar familh Van der Plas he doa kevrannoù er c'hevredad abaoe ma oa bet savet. E miz Genver 2025 he deus gwerzhet anezho da bP&P, a zo perc'henn 100 % bremañ. E 2024 e tizhe 1,6 miliard a euroioù sifr berzh an embregerezh hervez ar c'hazetennoù izelvroat¹⁸.

UN EMBREGEREZH O VONT DA LOBI

Kreizennañ an embregerezhioù kement ne vefe ket posupl ma ne vefe ket kreizennet ar galloud kement. N'eus nemet studiañ organigramoù an ensavioù dileuriañ evit filierenn ar pesketaerezh, pe e vefent reoliek evel Poellgor ar pesketaerezh, pe o fal ober labour ul lobi, evel ar c'hevredigezhioù tud a-vicher. Daou anv a vez gwelet diouzhtu : reoù Xavier Leduc ha Florian Soisson. Renner Euronor¹⁹ eo an hini kentañ, ha prezidant Orthongel, prezidant Unaniezh paramantourien Frañs ha merour Compagnie des Pêches²⁰. An eil, mab da bPatrick Soisson, rener kozh CDP²¹, a zo deuet da labourat war-lerc'h e dad goude bloavezhioù er finañs. Pennrener CDP eo-eñ, prezidant kuzul-merañ an aozadur produerien From Nord²² ha pevare besprezidant ar CNPMM. Gant ar c'hargoù-se e c'hellont gouzout atav petra eo ar reolennoù nevez, komz war-eeun gant an dilennidi vroadel hag europat, ha, dreist-holl, marc'hata ar

14] Teulioù kontadurezh PP Thon, marilh ar c'henwerzh hag an embregerezhioù, lez-varn armerzhel Kemper, 24 a viz Even 2020

15] « Un Néerlandais rachète la CFTO, n°1 français du thon », *Ouest-France*, 12 a viz Mae 2016

16] « Big 5, l'emprise de cinq géants néerlandais sur l'océan mondial », Bram Logger & Parcival Weijnen, danevell Bloom et Coöperatie Spit U.A., miz mae 2025

17] « CSR report 2023 », Parlevliet & Van der Plas


18] « Familie Parlevliet alleen verder met visserijreus Parlevliet & Van der Plas », Paul van Riessen, Quote, 24 a viz Genver 2025

19] Xavier Leduc, kont rouedad sokial LinkedIn, pajenn bet gwelet e miz Kerzu 2026

20] Fichenn titouroù Xavier Leduc, lec'hienn *societe.com*, pajenn bet gwelet e miz Kerzu 2026

21] Florian Moisson, kont rouedad sokial LinkedIn, pajenn bet gwelet e miz Even 2026

22] « Nos équipes », lec'hienn Nord, pajenn web bet gwelet e miz Kerzu 2026



Damien Roudeau

c'hotaioù, ar pezh a zo holl-ret evit kenderc'hel da labourat.

Seizh aozadur produerien²³, aet skuizh o izili da vezañ taget gant an ONGoù, moarvat, o deus savet ur gevredigezh troet war-zu an dud dre vras : « France Terre de pêches ». Ledanoc'h eo al labour lobi a vez graet ganto e mod-se. Lec'hienn France Terre de pêches a lak « liesseurte » pesketaerezh Frañs war-wel, ha diskouez a ra e zoareoù d'ober « pesketaerezh padus ». Menegiñ a ra eo bet arc'hantaouent gant Unaniezh

Meur a respet o deus Xavier Leduc ha Florian Soisson e-barzh filieren ar pesketaerezh.

Europa. Goulennet hon eus gant an aozadur penaos e oa bet krouet. Sed aze o respont : « Krouet eo bet hon aozadur peogwir hon oa merzet un dra ben-nak : hep ar besketaerien e vez graet ar breud foran diwar-benn ar pesketaerezh alies. Lakaat ar pezh a c'hoarvez war an dachenn da vezañ anavezet, displegañ an doareoù d'ober, ar redioù reoliek hag ekonomikel, ha kemer perzh en tabut diwar-benn merañ ar pesketaerezh gant titouroù fetis, setu hor palioù. » Gant an ajañs « Backbone consulting » eo bet savet al lec'hienn,

23] « Sept organisations lancent France terre de pêches, pour médiatiser la voix des pêcheurs », Hélène Scheffer, *Le Marin*, 9 a viz Here 2024

avat. Danzen « *strategiehoù levezoniñ ha kehentiñ diouzh ar muzul* » eo he mi-cher. Kinnig a ra an ajañs d'he fratikoù « *danevelliñ ar c'hemmoù o c'hoarvezout* » ha « *mestroniañ [o] skeudenn* ». Labourat a ra ivez evit Axa, KPMG ha France Assureurs. Terre de Pêches a « *gemer perzh en tabut* » gant gerioù choazet mat, hag o vezañ kuzuliet mat, anat eo.

PESKETAERIEN ARTIZANED MAEZ EUS AR JEU

Ar besketaerien artizaned, eus o zu, ne gavont ket kalz harp na kalz sikour. Un doare pesketa disheñvel-tre diouzh ar pesketaerezh in- dustriel eo an hini a vez difennet ganto. Fellout a rafe dezho lakaat o feson d'ober da dalvezout, bezañ klevet gant ar besketaerien all, ingalañ ar pesked en ur mod reizh, ha reiñ o soñj diwar-benn merañ ar stokoù. Met penaos bezañ klevet a-enep da embregerezhioù liesvroadel o deus arc'hant, gwiraourien ha pouez politikel ? O statud n'eus ket anezho ez-ofisiel, da gentañ. N'eus termenadur resis ebet evit ar pesketaerezh artizanel e Frañs, pa vez anezhañ e broioù europat all. Gant ar Stad e vez rummadoù²⁴ : ar

pesketaerezh bihan (mare-mor din- dan 24 eurvezh), ar pesketaerezh aod (mare-mor etre 24 ha 96 eurvezh), ar pesketaerezh en donvor (ouzhpenn da 96 eurvezh) hag ar pesketaerezh bras (en tu all da 20 devezh).

Se 'zo kaoz n'eus tra sklaer ebet. Hervez lod e kont ment al lestr hag e ostilhoù pesketa : ne vefe anvet « pes- ketaerezh artizanel » nemet ar bigi bihanoc'h eget 12 metr lec'h ma vez graet gant ostilhoù chag, evel ker- din-higennoù ha kevell. Evit lod e kont identelezh ar pesketaer a rank bezañ paramantour, pesketaer ha mestrouer war un dro, ha neuze e c'heller ober

**« Evit se e
rankfemp reiñ
peadra d'ar
besketaerien a ya
war vor da vont da
Bariz pe da Vrusel
da reiñ o soñj. »**

« artizanel » eus cha- luterioù 20 metr a chom pemzektez war vor. Met un dra sur a zo : a-du emañ ar re a gomz evel « peske- taerien artizaned » hiziv evit lavar en em gavont forc'het diouzh an ensavioù

dileuriañ evel an aozadurioù produe- rien hag ar poellgorioù pesketaerezh ha ne vez ket dalc'het kont eus o soñj. Mestrouer ur vag-rouedañ 12 metr eo David Le Quintrec en Oriant. Savet en doa Unaniezh Frañs ar besketae- rien artizaned²⁵ (UFPA) e miz Meurzh 2024. Er goañv 2025 e tisplege e bera- goù e kambrige vag, chomet e porzh an

24] Fiche « Pêches professionnelles », Insee, 18 a viz Genver 2021, pajenn bet gwelet e miz Even 2026

25] « Une organisation patronale pour les pêcheurs en colère «pour être reçu et entendu» » Olivier Cléro, *Ouest-France*, 7 a viz Mae 2025

Ne gemer perzh en dilennadegoù michere nemet ur pesketaer diwar pevar.

Oriant gant ur barr-amzer. « *Minellet e vez genoù ar besketaerien artizanet e pep lec'h en Europa. Ar memes kudennoù hon eus tout, ret eo deomp en em unaniñ er porzhioù evit lakaat hor mouezh da vezañ klevet* », emezañ. Met an holl besketaerien ne savont ket a-du gant an UFPA. Rak nes d'ar gCoordination Rurale eo, ur sindikad labourerien-douar tost d'an tu dehoù pellañ, ha peogwir en deus David Le Quintrec komzet gant Jordan Bardella²⁶ war kaeoù porzh an Oriant e miz Genver 2024.

Linenner eo Thomas Le Gall e Gwaien. Ar gevredigezh Pêche Avenir Cap Sizun²⁷ en doa krouet e miz Ebrel 2023. Kejet hon eus gant lod eus izili ar strollad e loch ar gevredigezh, enni 35 linenner hag un dek roueder bennak. Tenn e oa an diviz etre ar re a damalle efedoù an dizingalded pa vez lodennet ar c'hotaioù, ar re a venege cheñchamant an hin ha penaos en em ober dioutañ, hag ar spesadoù nevez a zo o tont gantañ. Dre vras e kave d'an holl bezañ dibourvez ha disgwel en ur reizhiad dileuriañ na laosk ket anezho da reiñ o soñj. « *Ret e vefe adaozañ ar stumm gouarn evit ma vefe dileuridi eus pep tiriad. Evit se e*

rankfemp kaout ur perzh dileuriañ gwir, ha reiñ peadra d'ar besketaerien a ya war vor da vont da Bariz pe da Vrusel da reiñ o soñj. Krouiñ ur gumuniezh a c'hello merañ un takad mor asambles 'zo d'ober, d'am meno », eme dThomas Le Gall.

POELGORIOÙ AR PESKETAEREZH : LEVEZON AR PESKETAEREZH INDUSTRIEL DREIST-HOLL

Ar poellgorioù pesketaerezh, ensavadur kreiz a vez aozet an holl besketaerien tro-dro dezho, a vez lakaet en arvar gant ar c'hinnig all-se.

26] « À Lorient, la venue de Jordan Bardella saluée par une trentaine de pêcheurs bretons », Stéphane Bacro, Nicolas Guégan. *Ouest-France*, 23 a viz Genver 2024

27] « Thomas Le Gall, ligneur porte-parole des pêcheurs d'Audierne », Franck Jourdain, *Le Marin*, 21 a viz Gouere 2023

Ensavadurioù bras int, ha ne 'z eont ket en-dro ken bremañ war a seblant. Tri live o deus : an departamant, ar rannvro hag ar Stad a-bezh. Stadet eo o mont-en-dro e Kod ar maezioù²⁸ hag ar pesketaerezh mor. « *Gwechall e oa ul live lec'hel, gant un den a anaveze pep hini er porzhioù. Aesoc'h e oa aozañ ar c'henvevañ etre ar micherioù disheñvel ha kendivizout a veze graet war ar prim. N'eus ket mui eus al live-se abaoe 2010 ha domaj bras eo* », eme gKen Kawahara, penn-sekreetour kevredigezh linennerien beg Breizh (ligneurs de la Pointe de Bretagne), keuz ennañ.

Abaoe neuze e tiskouez an dileuridi bezañ pelloc'h-pellañ diouzh an dachenn pa bigner war-zu live Frañs. E live an departamant n'eo ket aes d'ar vestrouiri kemer perzh, rak perc'henned int war o bag dezho ha mont war vor a rankont ober. « *Evit bezañ dilennet e rank ar besketaerien kavout ul listennad tud prest da vont war ar renk en anv ur sindikad. Mont er porzh da gaozeal, kendrec'hiñ o c'henlabourerien hep bezañ sur da vezañ dilennet zoken. Ha ma vint e vo kalz amzer emvodoù ha kaozeadennoù pa ne vint ket paeet zoken. War-goust o embregerezh e reont alies, start*

Pennoù bras n'ez eont ket war vor hag arc'hant bras o deus. Int a c'hell kemer perzh en emvodoù ar filierenn.

a-walc'h eo », eme Solenne Le Guennec, renerez Poellgor-departamant ar pesketaerezh e Penn-ar-Bed. Gant se ne gemer perzh en dilennadegoù miche-rel nemet 16 % eus ar besketaerien e live ar rannvro, ha 22 % e live an departamant hag ar Stad.

Uheloc'h eget an departamant e vez pellaet muioc'h ar besketaerien artizanet diouzh ar postoù c'hoazh. E live ar rannvro e ro ar ministr kenaoz ar c'huzulioù en un diferad, ha harpet eo an aozadurioù brasañ, ez-otomatek. Kreñvoc'h eo c'hoazh e live ar

Stad, lec'h ma vez dasparzhet an daou-ugent ezel e pevar c'holaj. Bihan eo plas ar besketaerien artizanet enno. Lojik eo adkavout Florian Soisson²⁹ da vesprezidant ha Xavier Leduc da ezel eus kolaj dileuridi ar pennoù-embregerezh pesketaerezh mor evit an UAPF.

Pennoù an aozadurioù bras n'ez eont ket war vor hag arc'hant bras o deus. Int a c'hell kemer perzh en emvodoù hag en eskemmoù lec'hel, e live ar Stad hag Europa. A-hend-all, klañv e oa Olivier Le Nezet ha rediet da chom en aod pa oa bet dilennet e penn poellgor

28] Isrann 2 : Poellgorioù-rannvro evit ar pesketaerezh war vor hag al labour-douar war vor (Mellad R912-18 betek R912-35), Kod ar pesketaerezh war ar maez hag ar mor, e talvoud abaoe ar 1añ a viz Genver 2015

29] « Critiques sur le choix du nouveau vice-président au Comité national des pêches », Darianna Myszk, *Le Marin*, 12 a viz Kerzu 2023

« Fellout a ra deomp kaout listri donvor ivez, goude, evit mont da besketa en donvor gant kerdin-higennoù, da skouer. »

departamant ar Mor-Bihan e 2012. Pignet eo abaoe, betek mont da brezidant ar poellgor broadel. E pep lec'h emañ ar Breizhad bremañ, daoust dezhañ bezañ disputet kalz, e-touez e re zoken. 25 respet en deus³⁰, en o

zouez hini prezidant Poellgor broadel ar pesketaerezh³¹ hag ar sevel loened-mor, hini brezidant an aozadur etremicherel evit ar pesketaerezh France Filière Pêche, pe c'hoazh hini prezidant an SEM Lorient Keroman³², an embregerezh a vez meret porzh an Oriant gantañ.

KLASK UN AMZER-DA-ZONT

« Peseurt amzer-da-zont evit ar pesketaerezh e Frañs, etre modernaat ar gouarnerezh anezhañ ha merañ rannet an danvez ? » a zo titl danevell ti-tourañ komision aferioù ekonomikel ar Vodadenn vroadel³³ bet kaset da benn gant ar gannaded Stéphane Buchou ha Damien Girard. Klozañ a reont evel-se : « gant ar mod ma vez graet ar c'huzulioù – rannvroel ha broadel – ne vez

ket gwarantet e vefe dalc'het kont eus lies-seurted an embregerezhioù pesketaerezh. Ar pesketaerezh artizanel pe ar pesketaerezh aod bihan dreist-holl. [...] Ret eo stadañ ez eo mestr levezon ar pesketaerezh industriel rak dileuriet e vez muioc'h ar

30] « Olivier Le Nézet, «pêcheur de petits-fours» à la barre du lobby français de la pêche », Floriane Louison, *Mediapart*, 4 a viz C'hwevrer 2024

31] « Sous le feu des critiques, le milieu de la pêche s'enfonce dans la paranoïa », Floriane Louison, *Mediapart*, 7 a miz Even 2025

32] « Olivier Le Nézet élu président de la SEM Keroman », Lorient agglomération, 25 a viz Du 2020

33] Danevell kelaouiñ kinniget hervez mellad 145 ar reolenn, gant Poellgor an Aferioù Armerzhel diwar-benn dazont gouarnamant ar besketaerezh gall e servij merañ rannet ar binvioù pesketaerezh, Stéphane Buchou, Damien Girard), n° 1964, 15 a viz Here 2025

paramantadurioù framm et en ensavioù gouarn ». An daneveller, Damien Girard, en deus keuz goude e labour : « Penaos soñjal amzer-da-zont ar pesketaerezh e mod-se ? Diaes-tre eo kaout un ijin az a war an tu mat », emezañ en un ostaleri e-tal ar Vodadenn Vroadel.

Klasket he deus ober ar gevredigezh Pleine Mer oc'h aozañ kentañ festival ar pesketaerezh artizanel e Brest d'ar 6 a viz C'hwevrer 2026 : « Aozet hon eus an darvoud evel ma teu e teu. Fellout a rae deomp krouiñ ul lec'h evit kaozeal gant tud all eget an dileuridi ofisiel. Dizalc'h e oamp evit kaozeal, gellet hon oa eskemm seder, kaout soñjoù disheñvel hep ma 'z afe re bell », eme Charles Braine, pesketaer gant linennoù ha prezidant ar gevredigezh.

Ur youl heñvel a oa pa voe krouet ar gevredigezh Mer de Liens e 2022. O bag kentañ a vo prenet ganto³⁴ e 2026 : « Ambroug pesketaerien yaouank oc'h

en em staliañ a fell deomp ober, o vezañ ken-kevranneien ganto. Postañ arc'hant ganeomp a c'houlennomp gant ar si-toianed intereset, evel ma vez graet gant Terre de Liens. Sikour da besketaerien a grog gant ar pesketaerezh aod a c'hellomp ober, met fellout a ra deomp kaout listri donvor ivez, goude, evit mont da beske-ta en donvor gant kerdin-higennoù, da skouer », eme Augustin Maillard, e karg eus ar staliañ hag an treuzkas kevredadoù pesketaerezh evit an armatour kengret Mer de Liens.

Daoust hag e vo trawalc'h al luskoù-se evit terriñ aon ar re a wel tu fall an traoù : un amzer da zont gant listri industriel evel an Annelies Ilena eus un tu, hag eus un tu all, artizaned war o bigi aod ? N'eus forzh penaos e roont men-nozhioù evit amzer-da-zont en ur gen-nad n'en deus ket kalz anezho.

Catherine Le Gall

34] « Premier bateau en cours d'achat », Margot Le Fur, Mer de Liens, 12 a viz Eost 2025